



STAD AR C'HELENN DIVYEZH EK E BREIZH E 2008

- **ROADENNOÙ DISTRO-SKOL 2008**
- **STADEGOÙ AR BLOAVEZH-SKOL
2007/2008**

**ARSELLVA AR BREZHONEG
HERE 2008**

Taolenn

| | |
|--|----|
| Bilañs distro-skol 2008 | 3 |
| Sifroù pennañ | 3 |
| Ar c'hinnig kelenn divyezhek e 2008/2009 | 4 |
| Er c'hentañ derez | 4 |
| En eil derez | 6 |
| An niver a skolidi divyezhek | 8 |
| Emdroadur an niver a skolidi divyezhek | 8 |
| Sifroù distro-skol 2008 | 15 |
| Stagadennoù gant sifroù - Distro-skol 2008 | 23 |
| Stadegoù ar c'helenn divyezhek evit ar bloavezh-skol 2007/2008 | 29 |
| An departamantoù | 31 |
| Ar broioù | 33 |
| An DFKE | 36 |
| Ar c'humunioù | 39 |
| Klozadur | 45 |

Bilañs distro-skol 2008

Sifrouù pennañ

Digoradurioù

- **4 lec'h divyezhek nevez krouet er skolioù-mamm** (8 e 2007), da lavaret eo an niver izelañ abaoe 1996 :
 - 2 gant an deskadurezh publik.
 - 2 gant an hentad dre soubidigezh (Diwan).
 - Hini ebet en deskadurezh katolik.
- **3 skol ouzhpenn a ginnig ur c'hendalc'h en eil derez** (heñvel ouzh distro-skol 2007)
 - 2 gant an hentad publik : e Karaez-Plougêr (29) hag e Sant-Brieg (22).
 - ur skolaj Diwan zo bet digoret e Sant-Ervlan (44).

Sifrouù

- **12 287 skoliad divyezhek** a zo e Breizh bremañ ha 46 e Pariz :
 - pazenn an 3 000 skoliad zo bet tremenet gant Diwan : 3 030 e skolioù Diwan Breizh (ha 46 e Pariz).
 - pazenn ar 5 000 skoliad zo bet tremenet gant ar c'hlasoù divyezhek publik : 5 016 skoliad.
 - 4 241 zo skoliataet er c'hlasoù divyezhek katolik.
- **547 skoliad divyezhek ouzhpenn** e Breizh e-keñver 2007 (665 a oa e 2007 e-keñver 2006).
- En e uhelañ emañ ar c'hresk er skol gentañ : +230 (+170 er skol-vamm).
- El Liger-Atlantel emañ ar feur kreskiñ en e uhelañ: +9,3%.
- E **bro Vrest** emañ o chom tost ar c'hard eus skolidi divyezhek Breizh atav. Derc'hel a ra he fouez dreist. 28% eus ar skolidi skoliataet ouzhpenn er c'helenn divyezhek en distro-skol-mañ zo skoliataet er vro-mañ.
- **Gwened** a chom ar gumun a skoliata ar muiañ a skolidi divyezhek (564) daoust d'un digresk ar bloaz-mañ. War-nes tremen dreist dezhi emañ Roazhon avat (553).

Emdroadurioù

- **Kenderc'hel a ra** an niver a skolidi divyezhek **da greskiñ : 4,66% e Breizh ; ar feur kreskiñ izelañ bet biskoazh eo.**
- En **hentad divyezhek publik** emañ ar c'hresk brasañ evel m'emañ abaoe an tri distro-skol diwezhañ : **+8,17%** (8,69% e 2007).



Ar c'hinnig kelenn divyezhek e 2008/2009


Da zistro-skol 2008, eus ar skol-vamm d'al lise e renabler e Breizh **377 skol** (364 skol e 2007/2008) ma'z eus ur c'hlasad divyezhek da nebeutañ. Dasparzhet int e **126 kumun** (122 e 2007/2008), da lavaret eo 8,4% eus kumunioù Breizh. Ul lec'hiad zo e Pariz.

Er c'hentañ derez

4 lec'h divyezhek nevez a zo er c'hentañ derez da zistro-skol 2008 :

- 2 lec'h gant an hentad publik (4 e 2007) : Pleiber-Krist (29) ha Ploveren (56).
- 2 skol gant Diwan (1 e 2007), da lavaret eo kement ha gant an hentad publik : unan e Penn-ar-Bed e Lokournan hag eben en Il-ha-Gwilen e Magoer da lavaret eo krouidigezh eil skol dre soubidigezh an departamant goude hini Roazhon 31 bloaz zo.
- Lec'h ebet gant an hentad prevez katolik (3 e 2007) : **gwech kentañ biskoazh ne vefe lec'h nevez ebet gant an hentad par-ouzh-par er skolioù katolik.** Gwashoc'h c'hoazh, serret eo bet lec'h divyezhek kentañ derez an Oriant ma oa 50 skoliad eno e 2007/2008 koulskoude.

*Stad diorren ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez (skolioù-mamm ha skolioù kentañ)
- Distro-skol 2008*



169 lec'h a gonter er skol-vamm, 162 er skol gentañ. An hentad divyezhek publik eo a ginnig ar muiañ a lec'hioù : 72 lec'h divyezhek er skol-vamm.

Muioc'h a lec'hioù nevez zo er skol gentañ eget er skol-vamm : 8 lec'h nevez zo er skol gentañ (da lavaret eo e kendalc'h an hentad divyezhek er skol gentañ) **pa n'eus nemet tri lec'h ouzhpenn er skol-vamm** e distro-skol 2008 e-keñver hini 2007 (4 lec'h zo bet krouet er skol-vamm met unan zo bet serret en Oriant).

Buan eo bet kendalc'het an hentad divyezhek er skol gentañ el lec'hioù digoret e 2007 : kenderc'hel a ra er skol gentañ en holl lec'hioù krouet e 2007 (e Surzhur e oa kroget an hentad divyezhek c'hoazh er skol gentañ adalek krouidigezh al lec'h) : 4 lec'h publik ouzhpenn er skol gentañ (Bear, Bulad-Pestivien, Plougonvelen ha Plozeved), daou lec'h prevez katolik (Perroz-Gireg ha Gwitreg) ha daou lec'h gant Diwan (Kastellin hag ar skol Diwan krouet er Chapel-Nevez e 2006 herberc'hiet e Plounevez-Moedeg da c'hortoz mont da Logivi-Plougraz).

En hentad publik ne gendalc'h ket er skol gentañ e tri lec'h (war bouez an daou nevez krouet e 2008) : Daoulaz krouet e 2006, eil lec'hiad Lannarstêr krouet e 2000 hag eil lec'hiad an Oriant krouet e 2005 (15 skoliad o deus ranket paouez gant ar c'helenn divyezhek eno er bloaz-mañ dre ziuver a bost krouet gant an Ensellerezh Akademiezh).

Gounezet ez eus bet ur gumuniezh kumunioù gant un hentad divyezhek : hini Traoñ an Il gant skol Diwan Magoer. **61 framm etrekumunel** zo gant ul lec'h divyezhek d'an nebeutañ diwar ar 140 framm etrekumunel zo e Breizh, da lavaret eo 44 % eus ar frammoù etrekumunel.



Anat eo pegen pouezus eo evit ar gerent kaout ur c'hinnig tost d'o lec'h annez. Gwelet a reer war ar gartenn kinniget pajenn 4 e chom toulloù e kornôg Breizh ha tachennoù gwerc'h ledanoc'h c'hoazh er reter. **Mantrus eo neuze ne vefe ket bet kaset da benn, er bloaz-mañ adarre, raktresoù zo evit abegoù melestradurel pa oa trawalc'h a vugale ragenskrivet enno : Gwizien (24 skoliad), Sant-Stefan-Brengoloù (26 skoliad), Banaleg (22 skoliad), h.a. N'eus bet lec'h nevez ebet en Aodoù-an-Arvor an distro-skol-mañ** nag el Liger-Atlantel evit ar pezh a sell ouzh ar c'hentañ derez evit an eizhvet bloavezh da-heul.

Stad diorren ar c'helenn divyezhek e pep hentad (skolioù-mamm ha skolioù kentañ) - Distro-skol 2008



Diskouez a ra ar c'hartennoù-se eo gant ar prevez emañ ar rouedad en he digempouesañ : bezant eo an hentad e Bro-Leon hag e bro Kêr-Wened dreist-holl. Gant Diwan e vez tizhet ar c'hornioù pobletañ (an aodoù hag ar c'hêrioù bras pe etre). Gant ar publik emañ ar rouedad stankañ hag a denn kalzik da gartenn hollek ar c'hinnig neuze.

Keñveriadenn an niver a lec'hioù publik nevez digoret e Breizh hag e Penn-ar-Bed gant Elzas ha Norzheuskadi



O keñveriañ gant Elzas ha Norzheuskadi, daou diriad ma ya war-raok an hentadoù divyezhek ha m'eo kreñv pouez ar c'helenn divyezhek er boblañs skol (s.o. al lodenn *Stadegoù ar c'helenn divyezhek evit ar bloavezh-skol 2007/2008*, p. 30), e verzer he deus Breizh dilañs e-keñver an digeriñ lec'hioù nevez :


- Ma vije kement ha kement Elzas ha Breizh e vefe bet digoret **25 lec'h publik nevez** en distro-skol-mañ da lavaret eo 12,5 gwezh muioc'h eget ar pezh zo bet digoret e gwirionez. Ma keñverier gant Penn-ar-Bed (an departamant a zigor ar muiañ a lec'hioù publik) e vefe bet digoret 5 lec'h en distro-skol.
- Ma vije kement ha kement Norzheuskadi ha Breizh e vefe bet digoret **220 lec'h publik nevez er pevar bloaz diwezhañ**, da lavaret eo ez eo **en tu all da 200 lec'h publik a vank abaoe 2004**.

En eil derez

Da zistro-skol 2008, **3 skol ouzhpenn** a ginnig ur c'hendalc'h en eil derez gant ar c'helenn divyezhek :

- 2 gant an hentad publik : ur skolaj e Karaez-Plougêr (29) hag ur skolaj e Sant-Brieg (22)
- ur skolaj Diwan e Sant-Ervlan, skolaj Diwan kentañ al Liger-Atlantel hag hini kentañ reter Breizh.

Stad ar c'helenn divyezhek kinniget en eil derez (skolajoù ha liseoù) - Distro-skol 2008



An darvoud pouezusañ evit an eil derez d'an distro-skol-mañ eo digoradur skolaj Diwan kentañ el Liger-Atlantel hag e reter Breizh zoken. Daou lec'h zo bet digoret gant an hentad publik diwar 10 goulenn digeriñ kevrennoù divyezhek er skolajoù : unan e Karaez hag egile e Sant-Brieg. An tu a ro an digoradur diwezhañ-se d'ar skolidi da genderc'hel gant ar c'helenn divyezhek e kêr-benn Breizh nemeti na ginnige ket un hentad divyezhek en eil derez betek-henn.

Chom a ra 20 lec'h divyezhek publik hep kendalc'h ebet er skolaj pa vez skolidi divyezhek ar c'hentañ derez en oad da vont d'an eil derez.


N'eus bet digoret lec'h ebet en eil derez gant an hentad katolik ha n'eus bet digoret lec'hiad ebet el lise e hentad ebet.

Chom a ra treut ar c'hinnig en eil derez e-keñver hini ar c'hentañ derez.

An niver a skolidi divyezhek

Emdroadur an niver a skolidi divyezhek


Emdroadur an niver a skolidi divyezhek dre hentad - Distro-skol 2008



Kenderc'hel a ra poblañs ar c'helenn divyezhek da greskiñ a vloaz da vloaz abaoe an deroù. Gorrekaat a ra an emdroadur da bep distro-skol avat. E studiadennoù ar bloavezhioù tremenet hor boa stadet an arvar a oa ne vefe ket tizhet an 20 000 skoliad bet lakaet da bal a-benn 2010 gant Kuzul-rannvro Breizh. Embannet hor boa ivez e vefe 14 000 skoliad divyezhek bennak e 2010 d'ar gwellañ tout ma kendalc'hfe an emdroadur gant ar memes lusk. Hogen izeloc'h eo sifr an distro-skol-mañ (12 287) eget ar pezh hor boa rakjedet evitañ (tost da 12 500). **Riskloù zo ne vefe ket tizhet ar 14 000 skoliad a-benn 2010 eta dre ma n'eo ket bet frammset diorren ar c'helenn divyezhek gant digoradurioù skolioù programmet.**


E gwirionez, kadarnaat a ra ar grafikoù amañ da-heul eo bihanoc'h-bihanañ an niver a skolidi divyezhek ouzhpenn da bep distro-skol ha seul vihanoc'h neuze ar c'hresk bloaziek. An niver bihan-tre a zigoradurioù nevez er skol-vamm a c'hoari kalz en tuadur-se : ret eo distreiñ da 1996 evit kavout ken nebeut a lec'hioù nevez (4) ha betek 1992 zoken ma ne gontar nemet al lec'hioù ouzhpenn war an hollad (d.l.e. 3 o vezañ m'eo bet serret klasoù divyezhek prevez an Oriant hep abeg tra ma oa 50 bugel skoliataet eno).

Emdroadur an niver a vugale ouzhpenn en hentad divyezhek da bep distro-skol abaoe 1996



Ret eo mont daouzek vloaz en a-raok evit kavout ur c’hresk izeloc’h eget hini 2008 e sifroù kriz : 547 skoliad ouzhpenn hepken tra ma oant 612 e 1997 d’ur mare ma save an hollad da 4 011 skoliad divyezhek hepken.


Emdroadur kresk bloaziek ar c’helenn divyezhek abaoe 1998



Biskoazh n’eo bet ken bihan kresk bloaziek ar skolioù divyezhek (e-keñver dregantad), dre ziuver a zigoradurioù : +4,66%. Izeloc’h-izelañ eo abaoe 2004. Rannet dre bevar eo bet feur ar c’hresk bloaziek en ur ober 10 vloaz.



Emroadur an niver a skolidi divyezhek dre zepartamant abaoe 1998




Feur emdreiñ etre 1998 ha 2008

| | |
|----------------|----------------|
| Aodou-an-Arvor | +118,5% |
| Penn-ar-Bed | +141,1% |
| Il-ha-Gwilen | +216,2% |
| Liger-Atlantel | +256,3% |
| Mor-Bihan | +199,3% |
| Breizh | +158,9% |

N'eus nemet ar Mor-Bihan ha Penn-ar-Bed o deus bet lec'hioù nevez o tegeriñ ingal e-kerzh an dek vloaz tremenet. Ha pa greskent atav, n'o deus ket emdroet ken buan ar sifroù en Aodou-an-Arvor hag e departamantoù all kornôg Breizh ; an diouer a zigoradurioù abaoe 2000 zo kaoz emañ kont evel se. En Il-ha-Gwilen hag el Liger-Atlantel e chom enket ar raktresoù skolioù er publik abaoe dek vloaz daoust da c'houlenn ar gerent a zo bras a-walc'h koulskoude. Dre chañs e kendalc'h ar skolioù zo anezho c'hoazh da ziorren ha da greskiñ (e-touez re vrasañ Breizh emañ skolioù divyezhek publik Naoned ha Roazhon). Adkregiñ a ra sifroù al Liger-Atlantel da greskiñ goude tri bloavezh chag a-drugarez d'an digoradurioù en eil derez peurgetket. A-hend-all, ez a war c'horrekaat kresk ar c'helenn divyezhek er Mor-Bihan abaoe 2007 : disoc'h diaesterioù an diorren en hentad prevez eo pergen, ha hi bet birvidik en departamant-se.

Feur emdreiñ an niver a skolidi divyezhek dre hentad ha dre departamant da zistro-skol 2008 e-keñver 2007



Eus an hentad publik e teu ar brasañ eus kresk 2008, adarre. War vihanaat un tamm ez a e feur kreskiñ avat (8,2% e-skoaz 8,7% e 2007 ha 9,9% e 2006). A-benn ar fin, n'eus nemet e Penn-ar-Bed ez eo mat an dregantad (+14,6%); feur kreskiñ an hentad publik en departamantoù all n'eo ket gwelloc'h eget re an hentadoù all.

En e uhelañ abaoe 2004 emañ kresk bloaziek Diwan er bloaz-mañ. N'he deus ket c'hoazh adkavet al lusk kreskiñ a oa ganti a-raok ma vefe nac'het hec'h enframmar en deskadurezh publik (2002). Ar braz eus ar c'hresk a zeu eus ar skolidi gozh a gendalc'h gant o hentad muioc'h eget eus ar vugale nevez a grog gant o amzer-skol (+0,41% er skolioù-mamm e-skoaz +4,3% en eil derez da skouer). Tu zo da vagañ spi evit an dazont, koulskoude, dre m'eo krog en-dro an hentad dre soubidigezh da grouiñ skolioù. Da ziwall zo er Mor-Bihan memes tra m'eo negativel an emdroadur e tost an holl skolioù er bloaz-mañ, nemet Kistreberzh.

Mantrus eo emdroadur kresk bloaziek an hentad prevez katolik. Gantañ e oa al lañs brasañ betek 2005 (tost da 20% e oa ar c'hresk bloaziek keitat etre 1996 ha 2005) met digresket eo trumm betek tizhout er bloaz-mañ ul live par da hini Diwan. Ne notenner un emdroadur heverk nemet en departamantoù m'eo izel a-walc'h an niver a skolidi (kresk en Il-ha-Gwilen, digresk el Liger-Atlantel).


Bihanoc'h eget warlene eo kresk hollek ar sifroù e pevar departamant diwar bemp. Gorrekadur an hentad prevez a hañval bezañ abeg pennañ an tuadur-se: -0,8 poent e Penn-ar-Bed, -1,5 en Aodoù-an-Arvor (m'eo bihanoc'h kresk ar skolioù Diwan eget warlene, ouzhpenn), -2,2 boent en Il-ha-Gwilen ha -2,8 boent er Mor-Bihan (m'emañ an hentad prevez en e greñvañ koulskoude ha m'eo digresket sifroù Diwan war ar marc'had).

N'eus nemet el Liger-Atlantel m'eo brasoc'h ar c'hresk hollek eget warlene (+7,2 poent): brasoc'h eo kresk Diwan hag an hentad publik eno, ha bihanoc'h digresk er skolioù prevez

eget e 2007. Feur kreskiñ hollek uhelañ distro-skol 2008 a ya gant an departamant-se. Gwir eo ez eo bihanoc'h ar sifroù kriz eno eget e lec'h all met kalonekaus eo ez afe tuadur ar bloaz-mañ a-enep d'ar pezh a veze merzet da bep distro-skol abaoe deroù ar bloavezhioù 2000.

Er c'hontrol, ar feur izelañ a ya gant ar Mor-Bihan a veze atav ur feur kreskiñ dereat gantañ etre 2000 ha 2006. Gant politikerezhioù an Deskadurezh Stad hag an DDEC o c'hoari war un dro en departamant e teu an disoc'h-se. Splann eo an diouer a grouiñ skolioù er publik (ul lec'h nevez hepken hag en dije gelllet digeriñ warlene) hag ur gudenn a chom da ziskoulmañ en Oriant (Merville). Er prevez eo bet lamet kuit krak ha berr daou glas divyezhek an Oriant (tremen 50 bugel nebeutoc'h) ha n'eus bet digoret lec'h nevez ebet er Mor-Bihan.

Emdroadur an niver a skolidi divyezhek dre live ha dre zepartamant da zistro-skol 2008 e-keñver 2007



Mont a ra an niver a skolidi divyezhek war gresk gant ar c'hentañ derez hag ar skolioù kentañ dreist-holl : eno emañ ar c'hresk uhelañ gant ar sifroù kriz (+230 da lavaret eo 42% eus kresk an holl liveoù bodet). Dre-vras eo kadarnaet an emdroadur a oa bet merzet er bloavezhioù tremenet : n'eo ket kenkoulz ar c'hresk er skolioù-mamm hag er skolioù kentañ (gwir eo ivez gant ar c'henfeurioù). Un emdroadur nec'hus eo hag a zispleg perak e c'horreka emdroadur sifroù an deskadurezh divyezhek a vloaz da vloaz : **re nebeut a zigoradurioù a zo e pep hentad gant an diaes m'eo kas ar raktresoù da benn**, ar pezh a vir da zerc'hel gant al lusk diorren evel ma oa hag a vevenn kalz dazont ar c'helenn divyezhek en e bezh.

Tost an div drederenn eus ar c'hresk a zeu eus departamant Penn-ar-Bed hepken, n'eo ket peogwir e vefe du-hont un emdroadur dreistordinal met kentoc'h en abeg d'ar skoilhoù a




zo d'an diorren en departamantoù all. Pa seller ouzh ar feurioù emdreiñ er c'hentañ derez e verzer emañ ar sifroù gwellañ gant Penn-ar-Bed, al Liger-Atlantel hag an Il-ha-Gwilen.

En deskadurezh hollek e konter muioc'h a vugale er skolioù kentañ (pemp bloavezh skoliata) eget er skolioù-mamm (pevar bloavezh skoliata d'ar muiañ) dre-vras. E Breizh, da skouer, e sav an darempred da 0,7 well-wazh, da lavaret eo e konter 7 bugel er skolioù-mamm evit 10 er skolioù kentañ. Liammet strizh ouzh ar boblañsouriezh eo ar stad-se.

En hentadoù divyezhek n'emañ ket kont evel-se en abeg d'al lusk diorren a zo ganto. En ur gumun bennak, pa ziskenn an **darempred skolioù-mamm/skolioù kentañ** er c'heleñn divyezhek d'ar sifr keitat (0,7) ez eus tu da lavaret en deus tizhet un doare kempouez ha n'ez aio ket kalz e sifroù war greskiñ ken keit ha ne vo ket digoret ur skol nevez en tolead.


Da 0,97 e sav an darempred-se evit an hentadoù divyezhek da zistro-skol 2008. Danvez o deus c'hoazh da vont war-raok neuze. Koulskoude, an danvez-se n'eo ket ken bras ha ma oa gwechall. E 1999 e save an darempred da 1,24 da skouer.

Emdroadur keñveriet an niver a skolidi divyezhek er skolioù-mamm hag er skolioù kentañ e 1999, 2004 ha 2008



Ar gartenn-se a ziskouez mat an tuadur-mañ : e 1999 e oa muioc'h a skolidi divyezhek er skolioù-mamm eget er skolioù kentañ e pep departamant. An dra-se n'eo ket gwir ken e 2008, nemet e Penn-ar-Bed.

Emdroadur keñveriet sifroù ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez abaoe 1999 diouzh hended an digoradur kentañ er c'humunioù





Div elfenn a ya d'ober kresk hollek an niver a skolidi divyezhek, evel-just : ar c'hresk liammet ouzh an digeriñ lec'hioù nevez (kresk "diavaez") ha kresk "diabarzh" ar skolioù kozh. Krommenn emdroadur ar sifroù er c'humunioù pourvezet e 1999 hepken a ziskouez e kendalc'h ar sifroù da vont war-raok gant ar c'hresk diabarzh hepken, kement-se gant ul lusk fonnus pe fonnusoc'h diouzh degouezh pep takad. Etre 1999 ha 2008 eo kreñvoc'h ar c'hresk diabarzh e Penn-ar-Bed eget er Mor-bihan ha kreñvoc'h er Mor-bihan eget en Aodoù-an-Arvor, da skouer.

Digeriñ ingal skolioù nevez zo ezhomm ouzhpenn ar c'hresk diabarzh evit ma chomfe ar c'hresk hollek en e sonnañ avat. Ar gartenn amañ a-us a gadarna an tuadur "seul vui, seul c'hoazh" a c'hoari evit Penn-ar-Bed da gentañ. **Prouiñ a ra e c'heller kenderc'hel da grouiñ skolioù lec'h ma'z eus anezho dija hag ober berzh ganto.** Diskouez a ra ivez an ezhomm zo da lakaat an tuadur-se da dalvezout en holl zepartamantoù.

Sifroù distro-skol 2008

12 287 skoliad o deus un deskadurezh divyezhek brezhoneg-galleg e Breizh da zistro-skol 2008. War gresk ez a an hentadoù divyezhek atav. Da lavaret eo ez eus **547 skoliad ouzhpenn** en hentadoù divyezhek e Breizh e-keñver 2007.

Dasparzh an niver a skolidi divyezhek hag ar skolidi nevez skoliataet dre zepartamant - Distro-skol 2008



Dasparzh ar skolidi skoliataet ouzhpenn er c'heleñn divyezhek

Dasparzh an niver a skolidi divyezhek




Penn-ar-Bed eo atav an departamant a skoliata **ar muiañ a skolidi divyezhek** e Breizh, met n'eo ket ken dreist e bouez hag er peurrest eus poblañs ar yezherien avat (tremen 50% eus ar vrezhonegerien deuet d'o oad a oa o chom e Penn-ar-Bed hervez enklask 1999 an EBSSA¹). Daoust da bep tra ez eo aet pouez an departamant-se war greskiñ er poblañs skol p'eo digresket hini ar Mor-Bihan.

Tost d'an div drederenn eus kresk an niver a skolidi divyezhek a zo o tont eus Penn-ar-Bed. An darn vrasañ eus ar skolidi skoliataet ouzhpenn e Penn-ar-Bed zo er skol-vamm ar pezh a zo yael evit emdroadur ar sifroù en distroioù-skol o tont ivez. En departamant-se emañ skoliataet 82% eus ar skolidi nevez e skolioù-mamm divyezhek Breizh ; un arouez eus pouez dreist Penn-ar-Bed eo ivez.


El Liger-Atlantel emañ feur ar c'hresk en e uhelañ : +9,3%. An disoc'h eus al lañs bet degaset gant krouidigezh an hentad divyezhek en eil derez koulz en hentad publik (e 2007) hag en hentad dre soubidigezh (skolaj Diwan Sant-Ervlan en distro-skol-mañ) ez eo. Bihan-kenañ eo ar c'hresk er Mor-Bihan (+1,70%) hag en Aodoù-an-Arvor ma'z a war zigreskiñ an niver a skolidi er skol-vamm zoken. Digoret ez eus bet tost div wezh nebutoc'h a lec'hiadoù divyezhek en Aodoù-an-Arvor (14 lec'h) eget er Mor-Bihan (25 lec'h) abaoe 2000.

¹ EBSSA : Ensavadur Broadel ar Stadegoù hag ar Studioù Armerzhel (INSEE e galleg)


Dasparzh an niver a skolidi divyezhek dre live ha dre zepartamant - Distro-skol 2008



- Skol-vamm
- Skol gentañ
- Skolaj
- Lise





Dasparzh ar skolidi divyezhek dre live e Breizh



Dasparzh ar skolidi skoliataet ouzhpenn en hentad divyezhek dre live en distro-skol 2008

En holl zepartamantoù, en tu all da beder fempvedenn eus ar skolidi divyezhek zo er c'hentañ derez.

Dasparzh an niver a skolidi divyezhek dre hentad - Distro-skol 2008




Dasparzh ar skolidi skoliataet ouzhpenn en hentadoù divyezhek en distro-skol-mañ

Dasparzh ar skolidi divyezhek dre hentad

- Hentad kevredigezhel (Diwan)
- Hentad an deskadurezh publik
- Hentad an deskadurezh prevez katolik


Dasparzh an niver a skolidi divyezhek dre hentad ha dre zepartamant - Distro-skol 2008



An hentad **publik** eo a skoliata **ar muiañ a skolidi divyezhek** atav. Tremenet eo an hentad publik en tu all da **5 000 skoliad** en distro-skol-mañ : 5 016 skoliad divyezhek. Gantañ emañ ar c'hresk brasañ er bloaz-mañ ouzhpenn-se ken er sifroù kriz (+379 skoliad), ken er feur kreskiñ (+8,17%), muioc'h eget an div drederenn eus ar skolidi skoliataet ouzhpenn er c'helenn divyezhek en distro-skol 2008 a zo o tont eus an hentad publik. Aet eo e bouez war greskiñ ar bloaz-mañ p'eo bet diskennet an hentad katolik e


Penn-ar-Bed da skouer : **an hanter eus kresk an distro-skol-mañ e Breizh a-bezh zo o tont eus lec'hioù divyezhek publik Penn-ar-Bed.** E gwirionez e kendalc'h an departamant-se gant al lusk kreskiñ stadet evitañ er bloavezhioù diwezhañ tra ma verzer e c'horreka ar c'hresk en departamantoù all.

Ar c'hinnig kelenn divyezhek dre vro –Distro-skol 2008



Ne chom nemet dek bro n'int ket pourvezet gant ur c'hinnig bennak e Breizh, evel en distro-skol 2007. En eil derez eo aet war-raok ar c'hinnig : digoret eo bet an hentad er skolaj e bro Sant-Brieg ma ne oa kinnig ebet c'hoazh.


Dasparzh an niver a skolidi divyezhek dre live ha dre vro - Distro-skol 2008



Bro Vrest a chom ar vro a zegemer ar muiañ a skolidi divyezhek : tost ur c’hard eus skolidi divyezhek Breizh zo skoliataet enni. Ganti emañ ar c’hresk kriz brasañ er bloaz-mañ ivez : 154 skoliad ouzhpenn, da lavaret eo 28% eus kresk an niver a skolidi divyezhek en distro-skol-mañ. Kresket eo bet mat an niver a skolidi e bro Roazhon hag e bro Kêr-Wened ha kreñvaet eo bet an div vro-se gant digoradurioù lec’hioù : ur skol Diwan e bro Roazhon (Magoer) hag ul lec’h publik e bro Kêr-Wened (Ploveren). E bro Gerne e stader ar c’hresk brasañ er skol-vamm : **ur c’hresk diabarzh eo el lec’hioù, er re nevez krouet an daou vloaz diwezhañ da skouer** (Brieg e 2006, ha Plozeved ha Kastellin e 2007), peogwir n’eus bet krouet lec’h nevez ebet er vro en distro-skol-mañ.

Kenderc’hel a ra an hentad divyezhek da ziorren da gentañ er broioù ma oa staliet mat dija. Padal e ya war zigreskiñ an niver a skolidi divyezhek e 4 bro (ne oa nemet ur vro a “golle” skolidi divyezhek en distro-skol 2007, hini Sant-Brieg). Fall eo bet an distro-skol e bro an Oriant da skouer. **Ned a ket ar goulenn war zigreskiñ met un diouer a zo er c’hinnig kentoc’h** (gw. ar pezh a denn da gêr an Oriant p. 22). A-hend-all e chom bresk ar c’helenn divyezhek e broioù zo abalamour d’an diouer er c’hinnig skolioù divyezhek. E gwirionez e c’hall bezañ cheñch-dicheñch an niver a skolidi e broioù zo evel e bro Bondi hag e bro Wengamp en distro-skol-mañ hag a goll un nebeud skolidi er skol-vamm pe bro Sant-Brieg en distro-skol 2007 da skouer. Ezhomm zo da greñvaat ar c’hinnig lec’hioù divyezhek er broioù-se o krouiñ lec’hioù nevez.

Dasparzh an niver a skolidi divyezhek dre hentad ha dre vro - Distro-skol 2008




Diwar an 19 bro gant ur c'hinnig divyezhek emañ an tri hentad divyezhek e 13 anezho, emañ daou hentad e 2 anezho (bro Bloermael ha bro Redon) ha 4 anezho na ginnigont nemet un hentad (bro ar Briver, bro Witreg, bro Sant Maloù ha bro Dinan). E Breizh-Uhel emañ an holl vroioù-se m'eo izeloc'h ar c'hinnig.

Kreskiñ a ra mat an niver a skolidi Diwan e bro Kornôg Kreiz-Breizh (a-drugarez d'al lise) hag e bro Naoned (kresk e skol Diwan Naoned ha krouidigezh ar skolaj e Sant-Ervlan). Met e verzer un digresk bihan gant Diwan e 7 bro en distro-skol-mañ : e holl vroioù ar Mor-Bihan, e bro Vrest hag e bro Gerne.

Aet eo kalz war greskiñ an hentad divyezhek publik e bro Vrest (+ 127 skoliad, da lavaret eo tost ur c'hard eus kresk an hentadoù divyezhek e Breizh). Mont a ra an hentad divyezhek publik war greskiñ en holl vroioù war bouez 4 bro zo gant un digresk bihan, anezho broioù m'eo bresk a-walc'h an hentad publik gant lec'hioù o unan e gwirionez.

Evit ar pezh a denn d'an hentad divyezhek katolik emañ bro Vrest gant ar c'hresk brasañ (+36) c'hoazh ha da-heul emañ bro Kêr-Wened (+29), **broioù ma vez bezant mat an hentad divyezhek katolik**. Daoust d'un distro-skol skoemp e ya war greskiñ an niver a skolidi en darn vrasañ eus ar broioù. War zigreskiñ ez a an niver a skolidi divyezhek e peder bro memes tra, bro an Oriant dreist-holl.



E 2008 ez a an niver a skolidi war greskiñ en div drederenn eus ar c’humunioù, e-giz an daou vloaz diwezhañ, pa oa un emdroadur en tri c’hard eus ar c’humunioù er bloavezhioù a-raok. Un digresk bihan a verzer gant an niver a skolidi en un drederenn eus ar c’humunioù ma’z eus un hentad divyezhek d’an nebeutañ e 2008 ; chomet eo heñvel an niver-se e 5 kumun ouzhpenn. Er Mor-Bihan ez eus ar muiañ a gumunioù gant un digresk : e 38% eus kumunioù an departamant a zegemer un hentad divyezhek ez a an niver a skolidi war zigreskiñ un tammig en distro-skol-mañ.

Gwened a chom ar gumun a skoliata ar muiañ a skolidi divyezhek eus ar skol-vamm d’al lise gant **564 skoliad** e 2008. Met sifr Roazhon a dosta da hemañ ; an diforc’h etre an div gêr zo tremenet eus 59 skoliad e 2007 da 11 hepken. **E Roazhon** eo e kaver c’hoazh an niver brasañ a skolidi divyezhek er c’hentañ derez avat. Dre-vras, pa renker ar c’humunioù diouzh sifroù ar c’hentañ derez eo kêrioù-penn departamantoù Breizh a zeu da gentañ (en urzh : Roazhon, Gwened, Naoned ha Kemper) nemet Sant-Brieg a erru d’ar 15^{vet} renk hepken.

Roazhon (+35 skoliad) ha Naoned (+28 skoliad) eo an eil hag an trede kumun m’eo aet an niver a skolidi war greskiñ ar muiañ da-heul Karaez-Plougêr (+37, a-drugarez da lise Diwan a skoliata 30 lisead ouzhpenn).

An Oriant eo al lec’h aroueziusañ eus an diaesterioù a c’hell talañ ar c’helenn divyezhek outo, er bloaz-mañ. En em ouestlet e oa kerent ar skolidi evit ma vefe digoret ur c’hlas divyezhek e **skol publik Merville**, e 2005, nepell eus lec’h divyezhek Nouvelle Ville a oa bet krouet e 2001. **Diskouez a ra splann an ezhomm kreñv zo da gaout meur a lec’h divyezhek er c’hêrioù bras rak war greskiñ ez a ar goulenn en div skol-se.** Evit an eil bloavezh diouzh renk ez eus bet nac’het gant Ensellerezh Akademiezh ar Mor-Bihan krouiñ ur post skolaer divyezhek e skol gentañ Merville e 2008. Goude 10 bugel e 2007 ez eo 15 a rank paouez gant ar c’helenn divyezhek e 2008 d’un oad ma n’eo ket kadarn ar yezh ganto. Mod pe vod ne c’hell ket ar vugale-se mont da skol Nouvelle Ville zo re leun he c’hlasoù divyezhek dija. En ur c’hlas unyezhek ez eus bet lakaet 20 bugel a

c'houlenne mont e-barzh hentad divyezhek skol-vamm Merville war ar marc'had. Er skol-se hepken e konter 35 bugel n'int ket evit ebarzhiñ pe chom er c'helenn divyezhek eta en desped da youl o c'herent ha da emouestl dilennidi e-leizh (kuzulierien-rannvro, kannaded, senedourien, h.a.). Eus tu ar prevez ez eo bet serret daou glas divyezhek **skol Sant-Kristol** gant an deskadurezh katolik, en Oriant atav ; 50 skoliad a oa enno warlene. **Ma konter an holl vugale meneget a-us en dije gellet an Oriant bezañ ar c'hresk brasañ er bloaz-mañ** (41 skoliad divyezhek ouzhpenn) **ha n'eo ket an digresk brasañ** (44 skoliad nebeutoc'h).

Stagadennoù gant sifroù Distro-skol 2008

An niver a skolioù divyezhek dre zepartamant ha dre live - Distro-skol 2008

| | Skolioù- mamm | Skolioù kentañ | Skolajoù | Liseoù | Hollad |
|----------------|------------------|-------------------|-----------|----------|------------|
| Aodoù-an-Arvor | 31 | 31 | 6 | 1 | 69 |
| Penn-ar-Bed | 68 | 65 | 15 | 5 | 153 |
| Il-ha-Gwilen | 11 | 10 | 2 | 1 | 24 |
| Liger-Atlantel | 5 | 5 | 2 | | 12 |
| Mor-Bihan | 54 | 51 | 13 | 1 | 119 |
| Breizh | 169 | 162 | 38 | 8 | 377 |



Sifroù aet war greskiñ



Sifroù aet war zigreskiñ

An niver a skolioù divyezhek e Breizh dre hentad ha dre live - Distro-skol 2008

| | Skolioù- mamm | Skolioù kentañ | Skolajoù | Liseoù | Hollad |
|-----------------|------------------|-------------------|-----------|----------|------------|
| Skolioù Diwan | 37 | 35 | 6 | 1 | 79 |
| Skolioù publik | 72 | 67 | 16 | 6 | 161 |
| Skolioù katolik | 60 | 60 | 16 | 1 | 137 |
| Hollad | 169 | 162 | 38 | 8 | 377 |



Sifroù aet war greskiñ



Sifroù aet war zigreskiñ

An niver a skolidi divyezhek dre zepartamant ha dre live - Distro-skol 2008

| | Skolioù- mamm | Skolioù kentañ | Skolajoù | Liseoù | Hollad | Kresk bloaziek | Feur kreskiñ |
|----------------|------------------|-------------------|-------------|------------|--------------|-------------------|-----------------|
| Aodoù-an-Arvor | 806 | 886 | 266 | 37 | 1995 | 73 | 3,80% |
| Penn-ar-Bed | 2185 | 2127 | 751 | 297 | 5360 | 335 | 6,67% |
| Il-ha-Gwilen | 367 | 387 | 83 | 23 | 860 | 42 | 5,13% |
| Liger-Atlantel | 190 | 211 | 23 | | 424 | 36 | 9,28% |
| Mor-Bihan | 1583 | 1662 | 379 | 24 | 3648 | 61 | 1,70% |
| Breizh | 5131 | 5273 | 1502 | 381 | 12287 | | |
| Kresk bloaziek | 170 | 230 | 89 | 58 | | 547 | |
| Feur kreskiñ | 3,43% | 4,56% | 6,30% | 17,96% | | | 4,66% |



Sifroù aet war greskiñ



Sifroù aet war zigreskiñ

An niver a skolidi divyezhek dre hentad ha dre live - Distro-skol 2008

| | Skolioù- mamm | Skolioù kentañ | Skolajoù | Liseoù | Hollad | Kresk bloaziek | Feur kreskiñ |
|-----------------|------------------|-------------------|-------------|------------|--------------|-------------------|-----------------|
| Skolioù Diwan | 969 | 1 165 | 665 | 231 | 3 030 | 63 | 2,12% |
| Skolioù publik | 2 362 | 2 121 | 410 | 123 | 5 016 | 379 | 8,17% |
| Skolioù katolik | 1 800 | 1 987 | 427 | 27 | 4 241 | 105 | 2,54% |
| Hollad | 5131 | 5273 | 1502 | 381 | 12287 | | |
| Kresk bloaziek | 170 | 230 | 89 | 58 | | 547 | |
| Feur kreskiñ | 3,43% | 4,56% | 6,30% | 17,96% | | | 4,66% |



Sifroù aet war greskiñ



Sifroù aet war zigreskiñ

An niver a skolidi divyezhek dre zepartamant ha dre hentad - Distro-skol 2008

| | Skolioù Diwan | Skolioù publik | Skolioù katolik | Hollad | Kresk bloaziek | Feur kreskiñ |
|----------------|---------------|----------------|-----------------|--------------|----------------|--------------|
| Aodoù-an-Arvor | 519 | 1 066 | 410 | 1995 | 73 | 3,80% |
| Penn-ar-Bed | 1 734 | 2 179 | 1 447 | 5360 | 335 | 6,67% |
| Il-ha-Gwilen | 118 | 516 | 226 | 860 | 42 | 5,13% |
| Liger-Atlantel | 218 | 174 | 32 | 424 | 36 | 9,28% |
| Mor-Bihan | 441 | 1 081 | 2 126 | 3648 | 61 | 1,70% |
| Breizh | 3 030 | 5 016 | 4 241 | 12287 | | |
| Kresk bloaziek | 63 | 379 | 105 | | 547 | |
| Feur kreskiñ | 2,12% | 8,17% | 2,54% | | | 4,66% |



Sifroù aet war greskiñ



Sifroù aet war zigreskiñ

Renkadur ar broioù diouzh an niver a skolidi divyezhek enno - Distro-skol 2008

| | Diwan | Publik | Katolik | Hollad | Kresk bloaziek |
|-------------------------|--------------|--------------|--------------|---------------|----------------|
| Bro Vrest | 799 | 1 091 | 916 | 2 806 | 154 |
| Bro Kêr-Wened | 237 | 227 | 782 | 1 246 | 50 |
| Bro Gerne | 434 | 675 | 92 | 1 201 | 80 |
| Bro Treger-Goueloù | 147 | 678 | 143 | 968 | 33 |
| Bro an Oriant | 70 | 558 | 241 | 869 | -42 |
| Bro Vontroulez | 194 | 272 | 387 | 853 | 49 |
| Bro Kornôg Kreiz Breizh | 307 | 285 | 239 | 831 | 57 |
| Bro Bondi | 81 | 104 | 479 | 664 | 19 |
| Bro Roazhon | 118 | 413 | 92 | 623 | 49 |
| Bro Wengamp | 226 | 207 | 131 | 564 | 29 |
| Bro an Alre | 53 | 90 | 369 | 512 | 13 |
| Bro Naoned | 155 | 174 | 32 | 361 | 37 |
| Bro Bloermael | - | 56 | 181 | 237 | 10 |
| Bro Sant-Brieg | 93 | 83 | 23 | 199 | 14 |
| Bro Redon | - | 80 | 99 | 179 | -14 |
| Bro ar Briver | 63 | - | - | 63 | -1 |
| Bro Dinan | 53 | - | - | 53 | 3 |
| Bro Witreg | - | - | 35 | 35 | 14 |
| Bro Sant-Maloù | - | 23 | - | 23 | -7 |
| Breizh | 3 030 | 5 016 | 4 241 | 12 287 | 547 |



Sifroù aet war greskiñ



Sifroù aet war zigreskiñ

Renkadur an DFKE diouzh an niver a skolidi divyezhek enno - Distro-skol 2008

| | Diwan | Publik | Prevez | Hollad | Kresk bloaziek |
|-------------------------------|-------|--------|--------|--------|----------------|
| K.T.K. Bro Kêr-Wened | 206 | 195 | 736 | 1137 | 43 |
| K-kêr Brest Meurgêr ar Mor | 366 | 411 | 231 | 1008 | 43 |
| K.T.K. Bro an Oriant | 70 | 464 | 241 | 775 | -51 |
| K.K. Plabenneg hag an Aberioù | 26 | 316 | 318 | 660 | 9 |
| K.T.K. Meurgêr Roazhon | 118 | 413 | 92 | 623 | 49 |
| K.T.K. Lannuon-Treger | 105 | 399 | 68 | 572 | 7 |
| K.T.K. Kemper Kumuniezh | 283 | 191 | 41 | 515 | -7 |
| K.K. Bro Lesneven hag Aod | 218 | | 215 | 433 | 3 |

| | | | | | |
|---|-----|-----|-----|-----|-----|
| ar Mojennoù | | | | | |
| K.K. ar Poc'hêr | 307 | 67 | 52 | 426 | 37 |
| K.K. Bro Landerne-Daoulaz | 59 | 289 | 50 | 398 | 46 |
| K.K. Bro an Alre | 53 | 90 | 251 | 394 | 7 |
| K-kêr Naoned | 155 | 174 | 32 | 361 | 37 |
| K.K. Gwengamp | 86 | 96 | 106 | 288 | 17 |
| K.K. Bro Landivizio | 69 | 60 | 143 | 272 | 11 |
| K.K. Bro an Hirwazh | 62 | 75 | 102 | 239 | 50 |
| K.K. Bro Bondi | 54 | 49 | 124 | 227 | -14 |
| K.K. Bae ar C'hernig | | 43 | 168 | 211 | 5 |
| K.K. Bro Gemperle | 93 | 110 | | 203 | 11 |
| K.K. Bro Leon | 79 | 45 | 76 | 200 | -8 |
| K.T.K. Bro Sant-Brieg | 93 | 83 | 23 | 199 | 14 |
| K.K. Bro Voulvriag | 140 | 30 | 25 | 195 | 19 |
| K.K. Kreiz Breizh | | 75 | 113 | 188 | -5 |
| K.K. Bro Josilin | | | 181 | 181 | 9 |
| K.K. Bro Redon | | 80 | 99 | 179 | -14 |
| K.K. Su ar Vro Vigoudenn | | 121 | 51 | 172 | 7 |
| K.K. Bro Logunec'h | | | 171 | 171 | 29 |
| K.T.K. Bro Vontroulez | 46 | 124 | | 170 | 41 |
| K.K. Bro ar Roue Morvan | | 46 | 74 | 120 | 11 |
| K.K. Bro Vaod | 27 | 55 | 38 | 120 | 16 |
| K.K. Bro Douarnenez | | 116 | | 116 | 14 |
| K.K. an Teir Stêr | | 58 | 47 | 105 | -19 |
| K.K. Bro Ploue, ag ar Skorff d'ar Blavezh | | 94 | | 94 | 9 |
| K.K. Kreiz Bro Dreger | | 93 | | 93 | 15 |
| K.K. "Pempoull-Gouelou" | 25 | 65 | | 90 | 5 |
| K.K. Bro Konk-Kerne | 45 | 41 | | 86 | 9 |
| K.K. Bro Venac'h | 0 | 81 | | 81 | -7 |
| K.K. Beg ar C'hra | 17 | 63 | | 80 | 15 |
| K.K. Stêr an Intel | | | 75 | 75 | 3 |
| K.K. Bro-C'hlazig | | 53 | | 53 | 18 |
| K.K. Dinan | 53 | | | 53 | 3 |
| K.K. Sant-Yann-Brevele Kumuniezh | | | 50 | 50 | -3 |
| K.K. Kerne-Uhel | | 47 | | 47 | 16 |
| K.K. al Loc'h | | | 46 | 46 | 3 |
| K.K. Aod ar Meurvein | | | 43 | 43 | 3 |
| K.K. Gorre ar Vro Vigoudenn | | 43 | | 43 | 22 |
| K.K. Gourenez Kraozon | 40 | | | 40 | 5 |
| K.T.K. Kab Atlantel | 36 | | | 36 | -4 |
| K.T.K. Gwitreg-Kumuniezh | | | 35 | 35 | 14 |
| K.K. Bro Bloërmael | | 33 | | 33 | 1 |
| K.K. Gourenez Rewiz | | 32 | | 32 | -4 |
| K.K. Bro Gistreberzh | 31 | | | 31 | 8 |
| K.K. Arvor ar Stêr-Aon | 28 | | | 28 | -2 |
| K.K. ar Yeun Elez | | 27 | | 27 | -1 |
| K.T.K. Bro Sant-Nazer hag hec'h Aber | 27 | | | 27 | 3 |

| | | | | | |
|----------------------------------|----|----|--|----|----|
| K.K. Bro Maoron ha Breselien | | 23 | | 23 | 0 |
| K.K. Kanton Kallag | | 23 | | 23 | -1 |
| K.T.K. Bro Sant-Maloù | | 23 | | 23 | -7 |
| K.K. Bro Gastellin hag ar Porzhe | 13 | | | 13 | 6 |
| K.K. Traoñ an Il | 5 | | | 5 | 5 |



Sifroù aet war greskiñ



Sifroù aet war zigreskiñ

K.K. : Kumuniezh kumunioù, K-kêr : Kumuniezh-kêr, K.T.K. : Kumuniezh tolpad-kêrioù

Renkadur ar c'humunioù diouzh an niver a skolidi divyezhek enno - Distro-skol 2008

| Renk | Kumun | Dep. | Krouidi-gezh | Diwan | Publik | Prevez | Hollad | Kresk bloaziek |
|------|---------------------|------|--------------|-------|--------|--------|--------|----------------|
| 1 | Gwened | 56 | 1993 | 206 | 79 | 279 | 564 | -13 |
| 2 | Roazhon | 35 | 1977 | 113 | 348 | 92 | 553 | 35 |
| 3 | Kemper | 29 | 1977 | 283 | 128 | 41 | 452 | 1 |
| 4 | Karaez-Plougêr | 29 | 1985 | 307 | 67 | 52 | 426 | 37 |
| 5 | Lannuon | 22 | 1978 | 88 | 274 | | 362 | 16 |
| 6 | Naoned | 44 | 1981 | 146 | 174 | 32 | 352 | 28 |
| 7 | Lanniliz | 29 | 1995 | | 230 | 118 | 348 | 12 |
| 8 | Landerne | 29 | 1987 | 59 | 200 | 50 | 309 | 25 |
| 9 | Plougastell-Daoulaz | 29 | 1995 | | 138 | 170 | 308 | 19 |
| 10 | Lesneven | 29 | 1981 | 118 | | 176 | 294 | -6 |
| 11 | Brest | 29 | 1978 | 189 | 87 | | 276 | -2 |
| 12 | Teiz | 56 | 1995 | | 66 | 197 | 263 | 22 |
| 13 | Lannarstêr | 56 | 1988 | | 202 | | 202 | -8 |
| 14 | Gwengamp | 22 | 1981 | 86 | 9 | 106 | 201 | 16 |
| 15 | Plabenneg | 29 | 1991 | 26 | | 163 | 189 | 2 |
| 16 | Pondi | 56 | 1984 | 54 | 49 | 83 | 186 | -14 |
| 17 | Redon | 35 | 1997 | | 80 | 99 | 179 | -14 |
| 18 | Releg-Kerhuon (ar) | 29 | 1988 | 177 | | | 177 | -1 |
| 19 | Sant-Brieg | 22 | 1979 | 93 | 83 | | 176 | 17 |
| 20 | Sant-Teve | 56 | 2002 | | 30 | 143 | 173 | 6 |
| 21 | Oriant (an) | 56 | 1978 | 70 | 78 | 16 | 164 | -44 |
| 22 | Kastell-Paol | 29 | 1978 | 79 | | 76 | 155 | -2 |
| 23 | Langedig | 56 | 2001 | | 45 | 104 | 149 | -3 |
| 24 | Plijidi | 22 | 1995 | 140 | | | 140 | 15 |
| 25 | Gwiseni | 29 | 1990 | 100 | | 39 | 139 | 9 |
| 26 | Rostrenenn | 22 | 1984 | | 75 | 63 | 138 | -8 |
| 27 | Kleder | 29 | 1991 | | 43 | 88 | 131 | 7 |
| 28 | Ploveur | 29 | 1993 | | 121 | | 121 | 9 |
| 29 | Henbont | 56 | 1997 | | | 121 | 121 | 10 |
| 30 | Logunec'h | 56 | 2003 | | | 117 | 117 | 24 |
| 31 | Douarnenez | 29 | 1989 | | 116 | | 116 | 14 |
| 32 | Gwitalmeze | 29 | 1977 | 54 | | 62 | 116 | 18 |
| 33 | Montroulez | 29 | 1988 | 46 | 60 | | 106 | 10 |
| 34 | Josilin | 56 | 2003 | | | 106 | 106 | 10 |
| 35 | Landivizio | 29 | 2000 | | | 104 | 104 | -24 |
| 36 | Mourieg | 56 | 2000 | | | 96 | 96 | -9 |
| 37 | Ploue | 56 | 1994 | | 94 | | 94 | 9 |
| 38 | Kawan | 22 | 1987 | | 93 | | 93 | 15 |
| 39 | Plistin | 22 | 1999 | | 91 | | 91 | -3 |
| 40 | Pempoull | 22 | 1984 | 25 | 65 | | 90 | 5 |
| 41 | Brec'h | 56 | 1989 | | 90 | | 90 | -7 |

| | | | | | | | | |
|----|-----------------------|----|------|----|----|----|----|-----|
| 42 | Pabu | 22 | 1991 | | 87 | | 87 | 1 |
| 43 | Plougerne | 29 | 1996 | | 86 | | 86 | 2 |
| 44 | Pleuwigner | 56 | 1994 | | | 83 | 83 | 6 |
| 45 | Baod | 56 | 1991 | 27 | 55 | | 82 | 8 |
| 46 | Plunered | 56 | 1998 | | | 82 | 82 | 21 |
| 47 | Plounevez-Moedeg | 22 | 2002 | 17 | 63 | | 80 | 15 |
| 48 | Ploueskad | 29 | 1999 | | | 80 | 80 | -2 |
| 49 | Gwidel | 56 | 1991 | | 77 | | 77 | -1 |
| 50 | Gwegon | 56 | 2000 | | | 75 | 75 | -1 |
| 51 | Lokoal-Mendon | 56 | 1994 | | | 75 | 75 | 3 |
| 52 | Gourin | 56 | 1994 | | 46 | 28 | 74 | 10 |
| 53 | Gwipavaz | 29 | 1995 | | 70 | | 70 | 0 |
| 54 | Kommanna | 29 | 1977 | 69 | | | 69 | 14 |
| 55 | Bruz | 35 | 2003 | | 65 | | 65 | 9 |
| 56 | Pleskob | 56 | 2005 | | | 64 | 64 | -1 |
| 57 | Santez-Anna-Wened | 56 | 1994 | | | 64 | 64 | -11 |
| 58 | Erge-Vras (an) | 29 | 2002 | | 63 | | 63 | -8 |
| 59 | Gwiler-Leon | 29 | 2002 | | | 61 | 61 | 2 |
| 60 | Loperc'hed | 29 | 2004 | | 61 | | 61 | 16 |
| 61 | Gouenou | 29 | 2004 | | 60 | | 60 | 16 |
| 62 | Sizun | 29 | 2004 | | 60 | | 60 | 9 |
| 63 | Perwenan | 22 | 1999 | | 58 | | 58 | 1 |
| 64 | Plouzane | 29 | 2003 | | 56 | | 56 | 9 |
| 65 | Skaer | 29 | 1998 | | 56 | | 56 | 1 |
| 66 | Tremeven | 29 | 2005 | | 54 | | 54 | 17 |
| 67 | Pluverin | 56 | 2005 | | | 54 | 54 | 5 |
| 68 | Dinan | 22 | 2000 | 53 | | | 53 | 3 |
| 69 | Brieg | 29 | 2006 | | 53 | | 53 | 18 |
| 70 | Alre (an) | 56 | 1999 | 53 | | | 53 | -2 |
| 71 | Surzhur | 56 | 2007 | | | 53 | 53 | 9 |
| 72 | Pont-'n-Abad | 29 | 1995 | | | 51 | 51 | -2 |
| 73 | Begnen | 56 | 2000 | | | 50 | 50 | -3 |
| 74 | Landreger | 22 | 1997 | | | 47 | 47 | -20 |
| 75 | Banaleg | 29 | 1982 | 47 | | | 47 | -12 |
| 76 | Kastell-Nevez-ar-Faou | 29 | 2003 | | 47 | | 47 | 16 |
| 77 | Rospezh | 22 | 2004 | | | 46 | 46 | -1 |
| 78 | Kemperle | 29 | 1989 | 46 | | | 46 | 5 |
| 79 | Faoued (ar) | 56 | 1993 | | | 46 | 46 | 1 |
| 80 | Gregam | 56 | 1996 | | | 46 | 46 | 3 |
| 81 | Pariz | 75 | 2004 | 46 | | | 46 | 22 |
| 82 | Rosko | 29 | 2002 | | 45 | | 45 | -6 |
| 83 | Tregon | 29 | 1982 | 45 | | | 45 | 2 |
| 84 | Louergad | 22 | 1998 | | 44 | | 44 | 2 |
| 85 | Plozeved | 29 | 2007 | | 43 | | 43 | 22 |
| 86 | Karnag | 56 | 1992 | | | 43 | 43 | 3 |
| 87 | Konk-Kerne | 29 | 1999 | | 41 | | 41 | 7 |
| 88 | Klegereg | 56 | 2004 | | | 41 | 41 | 0 |
| 89 | Kraozon | 29 | 1989 | 40 | | | 40 | 5 |
| 90 | Plouarzhel | 29 | 2006 | | | 40 | 40 | 6 |
| 91 | Plougonvelen | 29 | 2007 | | 39 | | 39 | 13 |
| 92 | Plouvorn | 29 | 2006 | | | 39 | 39 | 12 |
| 93 | Lanneur | 29 | 2004 | | 38 | | 38 | 5 |
| 94 | Mêlrant | 56 | 2006 | | | 38 | 38 | 8 |
| 95 | Benac'h | 22 | 1998 | | 37 | | 37 | 2 |
| 96 | Plouvien | 29 | 1996 | | | 37 | 37 | -7 |

| | | | | | | | | |
|-----|------------------------|----|------|----|----|----|----|-----|
| 97 | Milizag | 29 | 2006 | | 36 | | 36 | 5 |
| 98 | Gwenrann | 44 | 1999 | 36 | | | 36 | -4 |
| 99 | Pont-Skorf | 56 | 2001 | | 36 | | 36 | -7 |
| 100 | Gwitreg | 35 | 2007 | | | 35 | 35 | 14 |
| 101 | Tregastell | 22 | 1989 | | 34 | | 34 | -6 |
| 102 | Ploermael | 56 | 1994 | | 33 | | 33 | 1 |
| 103 | Sarzhav | 56 | 1993 | | 32 | | 32 | -4 |
| 104 | Kistreberzh | 56 | 2000 | 31 | | | 31 | 8 |
| 105 | Bear | 22 | 2007 | | 30 | | 30 | 8 |
| 106 | Perroz-Gireg | 22 | 2007 | | | 28 | 28 | 10 |
| 107 | Daoulaz | 29 | 2006 | | 28 | | 28 | 5 |
| 108 | Faou (ar) | 29 | 1998 | 28 | | | 28 | -2 |
| 109 | Groñvel | 22 | 1998 | | | 27 | 27 | 0 |
| 110 | Sant-Riwal | 29 | 1983 | | 27 | | 27 | -1 |
| 111 | Sant-Nazer | 44 | 1991 | 27 | | | 27 | 3 |
| 112 | Pleiber-Krist * | 29 | 2008 | | 26 | | 26 | 26 |
| 113 | Kewenn | 56 | 2006 | | 26 | | 26 | 2 |
| 114 | Boulvriag | 22 | 2005 | | | 25 | 25 | -4 |
| 115 | Bulad-Pestivien | 22 | 2007 | | 23 | | 23 | -1 |
| 116 | Mêl-Karaez | 22 | 2004 | | | 23 | 23 | 3 |
| 117 | Tregaeg | 22 | 2004 | | | 23 | 23 | -3 |
| 118 | Sant-Maloù | 35 | 2000 | | 23 | | 23 | -7 |
| 119 | Maoron | 56 | 2000 | | 23 | | 23 | 0 |
| 120 | Ploubêr | 22 | 2000 | | | 22 | 22 | -4 |
| 121 | Pluvergad | 56 | 1996 | | | 22 | 22 | 0 |
| 122 | Ploveren * | 56 | 2008 | | 20 | | 20 | 20 |
| 123 | Louaneg | 22 | 2006 | 17 | | | 17 | 5 |
| 124 | Kastellin | 29 | 2007 | 13 | | | 13 | 6 |
| 125 | Sant-Ervlan * | 44 | 2008 | 9 | | | 9 | 9 |
| 126 | Lokournan * | 29 | 2008 | 8 | | | 8 | 8 |
| 127 | Magoer * | 35 | 2008 | 5 | | | 5 | 5 |
| 128 | Chapel-Nevez** | 22 | 2006 | 0 | | | 0 | -11 |

 Sifroù aet war greskiñ

 Sifroù aet war zigreskiñ


* Lec'hiadoù nevez-digoret er gumun da zistro-skol 2008

** Skol treuzkaset da bPlounevez-Moedeg

Stadegoù ar c'helenn divyezhek evit ar bloavezh-skol 2007/2008

- **1,38%** eo an dregantad a **skolidi divyezhek** a oa er c'helenn dre-vras e Breizh e 2007/2008. Ar feur hollek-se he deus kresket eus 0,07 poent e-keñver 2006/2007. Kevatal eo ar c'hresk-se ouzh an hini a oa bet etre 2005/2006 ha 2006/2007 daoust ma n'eus bet nemet 8 lec'h nevez da zistro-skol 2007 e-keñver 10 e 2006. Stag eo an 1,38% a skolidi divyezhek ouzh feur izel ar skolioù ma vez kinniget ar c'helenn divyezhek e gwirionez : 5,1%.
- **Tremen 4%** eo dregantad an deskadurezh divyezhek er c'hentañ derez en daou zepartamant m'emañ ar c'helenn divyezhek en e greñvañ : **Penn-ar-Bed** (4,4%) hag ar **Mor-Bihan** (4,2%).
- **7,6%** eo dregantad ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez e **bro Treger ha Goueloù** (a zo e penn a-raok ar broioù e-keñver feur ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez). Er vro-se hag e bro Kornôg Kreiz-Breizh e tostaer da 5% eus hollad ar skolidi eus ar skol-vamm d'al lise enskrivet en un hentad divyezhek.
- **14,3%** eo ar feur uhelañ a vugale skoliataet en deskadurezh divyezhek e kentañ derez ur gumuniezh kumunioù (**Kumuniezh kumunioù Bro Josilin**, anezhi ur framm etrekumunel lec'hiet e Breizh-Uhel).
- E 2007/2008 e-keñver 2006/2007 eo **aet war-raok pouez ar c'helenn divyezhek e tremen an div drederenn eus ar c'humunioù ma'z eus ur c'hinnig**. Chomet eo stabil pe digresket eo er c'humunioù all. Ur wellaenn e-keñver ar bloaz a-raok eo (niverusoc'h e oa bet ar c'humunioù chomet stabil etre 2005/2006 ha 2006/2007).


Emdroadur keñveriet feur ar c'heleñn divyezhek galleg-yezh rannvro er c'hentañ derez e Breizh, en Elzas hag e Norzheuskadi etre 1999/2000 ha 2007/2008



Kalz gorrekoc'h eo kresk feur ar c'heleñn divyezhek e Breizh eget en Elzas pe e Norzheuskadi ken strizh eo an digeriñ skolioù eno.

An departamantoù

Pouez ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez dre zepartamant - Bloavezh-skol 2007/2008




E kornôg Breizh emañ pouez ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez en e greñvañ. Merzout a reer dreist-holl eo tost ken bras pouez an deskadurezh divyezhek er **Morbihan** hag e **Penn-ar-Bed**. Buan e tostae feur ar Mor-Bihan da hini Penn-ar-Bed betek 2006/2007 ma ne oa nemet 0,09 poent diforc'h etrezo, brasaet eo en-dro da 0,22 poent e 2007/2008 avat.

Splann eo ez eus dale gant departamant **Aodoù-an-Arvor** e-keñver an daou zepartamant-se. Daoust d'an tri lec'h nevez digoret ennañ da zistro-skol 2007 (e-keñver tri e Penn-ar-Bed hag unan hepken er Mor-Bihan), n'eo kresket feur Aodoù-an-Arvor nemet eus 0,11 poent e-keñver 2006/2007 e-skoaz 0,35 poent evit Penn-ar-Bed ha 0,22 poent evit ar Mor-Bihan. Disoc'h an diouer a glasoù digoret en departamant-se e-kerzh an dek vloaz tremenet eo an dilañs-se.

E **departamantoù ar reter** e chom izel feurioù ar c'helenn divyezhek abalamour d'an niver bihan a skolioù divyezhek eno. Daoust da youl ar gerent eo brasoc'h c'hoazh ar skoilhoù e tal ar raktresoù skolioù outo : en desped d'ur goulenn bras a-walc'h e meur a lec'h, n'eus bet nemet un digoradur evit an daou zepartamant-se etre 2004 ha 2007. **Chalusoc'h a se eo pa ouzer emañ tremen an hanter eus skolidi Breizh o chom en daou zepartamant-se.**

Pouez ar c'helenn divyezhek e poblañs pep live kelenn e pep departamant - Bloavezh-skol 2007/2008



Feur ar c'helenn divyezhek dre zepartamant ha dre live - Bloavezh-skol 2007/2008

| | Skolioù-mamm | Skolioù kentañ | Ishollad ar c'hentañ derez | Emdroadur e-keñver 2006/2007 | Skolajoù | Liseoù | Hollad |
|----------------|--------------|----------------|----------------------------|------------------------------|--------------|--------------|--------------|
| Aodoù-an-Arvor | 3,44% | 2,37% | 2,81% | +0,11 | 0,88% | 0,15% | 1,82% |
| Penn-ar-Bed | 5,43% | 3,75% | 4,44% | +0,35 | 1,67% | 0,72% | 2,98% |
| Il-ha-Gwilen | 0,81% | 0,60% | 0,68% | +0,03 | 0,17% | 0,05% | 0,43% |
| Liger-Atlantel | 0,35% | 0,24% | 0,28% | 0 | 0,01% | | 0,16% |
| Mor-Bihan | 5,09% | 3,61% | 4,22% | +0,22 | 1,19% | 0,10% | 2,66% |
| Breizh | 2,64% | 1,81% | 2,14% | +0,13 | 0,67% | 0,19% | 1,38% |



Sifroù aet war greskiñ



Sifroù aet war zigreskiñ

Stadañ a reer e kresk buanoc'h feur ar c'helenn divyezhek en departamantoù m'eo uhel dija. E skolioù-mamm Penn-ar-Bed, da skouer, ez eo kresket ar feur eus 0,49 poent e-keñver 2006/2007, da lavaret eo un dekvedenn ouzhpenn en ur ober ur bloavezh (ha kement-se gant teir skol nevez nemetken, ar pezh a ziskouez ez eus lusk gant ar skolioù kozh ivez).


E departamantoù ar reter emañ al lusk en e c'horrekañ (el Liger-Atlantel dreist-holl, digresket eo ar feur un tamm er skol-vamm zoken). Hogen, n'eus bet digoret skol divyezhek publik ebet el Liger-Atlantel abaoe 1999 hag en Il-ha-Gwilen abaoe 2003, ar pezh a gas da zigempouezioù (dek gwech gorrekoc'h eo diorren ar c'helenn divyezhek en Il-ha-Gwilen eget e Penn-ar-Bed da skouer). Diaes eo kompren an digempouezioù-se gant ar goulenn a vez eztaolet gant ar gerent.

Mantrus eo digresk ar feur el liseoù e departamantoù zo. Disoc'h an diaesterioù a vez d'ar c'hendalc'h en eil derez eo. Ma vefe aozet ar c'hinnig diouzh ar gwellañ, feur ar

c'helenn divyezhek er skolajoù a zlefe kreskiñ a-genfeur gant hini ar c'hentañ derez, heñveldra da c'houde el liseoù. Souezhus eo, da skouer, ne savfe kresk ar feur e skolajoù Penn-ar-Bed nemet da 0,01 poent e-keñver 2006/2007, ur gudenn zo aze. Er memes mod, diaes eo kompren e vefe un digresk eus 0,06 poent e liseoù ar Mor-Bihan : el lise ez eer 13 bloavezh goude bezañ en em gavet er skol-vamm, hogen e 1994 e oa dija ur skol divyezhek e 16 kumun eus ar Mor-Bihan (Gwened, an Oriant ha Lannarstêr en o zouez) hag 38 zo bremañ ; sklaer eo n'ez a ket diorren an hentadoù en eil derez gant ar memes lusk.

Ar broioù

Pouez ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez dre vro - Bloavezh-skol 2007/2008




E 6 eus an 29 bro emeur tremenet en tu all da 5% eus ar vugale en deskadurezh divyezhek bremañ, da lavaret eo unan ouzhpenn e-keñver warlene : bro Vrest. Dont a ra war wel emañ ar c'helenn divyezhek en e greñvañ e kornôg Breizh. A-hend-all, ne chom ken nemet dek bro hep tamm kinnig deskadurezh divyezhek ebet enno c'hoazh, da lavaret eo unan nebeutoc'h eget e 2006/2007 a-drugarez da zigoridigezh ur c'hlas e Gwitreg.

Gant bro Treger ha Goueloù emañ ar feur uhelañ atav (7,6%, da lavaret 0,5 poent ouzhpenn e-keñver 2006/2007). E penn a-dreñv broioù kornôg Breizh emañ bro Gerne c'hoazh ; bihanoc'h eget hini bro Bloermael eo he feur ha dregantad izelañ Breizh-Izel eo

war ar marc'had. Div skol divyezhek o doa digoret war tachenn bro Gerne da zistro-skol 2007 koulskoude met kenderc'hel a ra da baeañ meur a vloavezh dale en diorren.

Emdroadur feur ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez dre vro evit 2007/2008 e-keñver 2006/2007



Lennadenn : eus 0,15 poent eo kresket feur ar c'helenn divyezhek e kentañ derez bro an Oriant e 2007/2008, da lavaret eo e sav bremañ an dregantad da 3,53% tra ma save da 3,38% e 2006/2007.

En e greñvañ emañ ar c'hresk er broioù m'eo kreñv dija feur ar c'helenn divyezhek : bro Treger ha Goueloù (+0,53 poent), bro Ventronez (+0,44 poent), bro Kêr-Wened (+0,41 poent), bro Vrest (+0,37 poent). Poan en deus feur ar c'helenn divyezhek da vont war-raok er broioù m'eo izel dija, broioù ar reter dreist-holl peogwir e chom stag ar c'hresk enno ouzh kresk ar skolioù zo anezho dija hepken.

Feur ar c'helenn divyezhek dre vro ha dre live (urzhiat diouzh pouez ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez) - Bloavezh-skol 2007/2008

| | Skol-vamm | Skol-gentañ | Ishollad ar c'hentañ derez | Emdroadur e-keñver 2006/2007 | Skolaj | Lise | Hollad |
|-------------------------|-----------|-------------|----------------------------|------------------------------|--------|-------|--------|
| Bro Treger ha Goueloù | 9,67% | 6,25% | 7,61% | 0,53 | 1,28% | 0,61% | 4,64% |
| Bro Bondi | 7,51% | 5,80% | 6,51% | 0,28 | 0,94% | 0,00% | 3,92% |
| Bro Ventronez | 6,60% | 5,06% | 5,69% | 0,44 | 0,76% | | 3,53% |
| Bro Kornôg Kreiz-Breizh | 7,01% | 4,79% | 5,64% | 0,29 | 0,71% | 7,74% | 4,62% |
| Bro an Alre | 6,90% | 4,32% | 5,40% | 0,13 | 0,62% | | 3,33% |
| Bro Vrest | 6,22% | 4,35% | 5,13% | 0,37 | 2,64% | 0,21% | 3,45% |
| Bro Wengamp | 5,34% | 3,85% | 4,47% | 0,25 | 3,39% | | 3,66% |

| | | | | | | | |
|------------------------------|-------|-------|-------|-------|-------|-------|-------|
| Bro Kêr-Wened | 5,37% | 3,82% | 4,45% | 0,41 | 2,13% | | 2,98% |
| Bro an Oriant | 4,58% | 2,82% | 3,53% | 0,15 | 1,02% | 0,28% | 2,16% |
| Bro Bloermael - Kalon Breizh | 3,02% | 2,93% | 2,97% | -0,04 | 0,40% | | 1,75% |
| Bro Gerne | 3,73% | 2,35% | 2,91% | 0,28 | 1,00% | 0,07% | 1,82% |
| Bro Redon hag ar Gwilen | 1,57% | 1,73% | 1,67% | -0,03 | 0,59% | | 1,11% |
| Bro Roazhon | 1,36% | 0,92% | 1,10% | 0,04 | 0,27% | 0,09% | 0,63% |
| Bro Sant-Brieg | 0,89% | 0,88% | 0,89% | -0,1 | | | 0,46% |
| Bro Naoned | 0,79% | 0,50% | 0,61% | -0,01 | 0,03% | | 0,29% |
| Bro Dinan | 0,60% | 0,38% | 0,47% | 0,02 | | | 0,28% |
| Bro Gwenrann hag ar Briver | 0,30% | 0,27% | 0,28% | 0,03 | | | 0,15% |
| Bro Sant-Maloù | 0,15% | 0,20% | 0,18% | 0,03 | | | 0,10% |
| Bro Witreg | 0,41% | | 0,17% | 0,17 | | | 0,10% |



Sifroù aet war greskiñ



Sifroù aet war zigreskiñ



An tri feur uhelañ zo evit pep live-skol


Gant ar memes broioù hag e 2006/2007 ez a ar feurioù uhelañ dre-vras. Ur skouer ouzhpenn eus an tuadur en deus ar c'helenn divyezhek da greñvaat er broioù m'eo kreñv dija.

Unan eus ar cheñchamantoù diskouezet er renkadurioù amañ a-us eo digresk feur ar c'helenn divyezhek e skolioù-mamm bro an Alre (-0,12 poent e-keñver 2006/2007) ; gant se he deus kollet he zrede renk evit bro Kornôg Kreiz-Breizh. **N'eus bet digoradur nevez ebet e bro an Alre abaoe 1999** e gwirionez, ar pezh a zispleg an dilañs-se. Er c'hontrol, bro Treger ha Goueloù, bro Bondi ha bro Kornôg Kreiz-Breizh zo kresket mat o feur, broioù ma'z eus bet digoradurioù nevez zo int.

A-hend-all eo mantrus an tuadur da zigreskiñ a verk broioù zo evel bro Naoned ha bro Sant-Brieg peurgetket met liammet eo ouzh an diouer a lec'hioù nevez krouet. Dre chañs e kendalc'h ar feurioù da greskiñ peurliesañ. Broioù a oa kreñv pe kreñvoc'h dija a gendalc'h da vont war-raok atav : bro Vontroulez, bro Kêr-Wened, bro Wengamp. Daoust da se eo skodegus gwelet pegen treut e chom ar c'hinnig divyezhek en eil derez e broioù ma tiorren gant lusk er c'hentañ derez. Bro Treger ha Goueloù zo er penn a-raok er c'hentañ derez met ne ginnig nemet an hentad publik en eil derez e Lannuon. Er memes mod eo kudennek stad ar c'hinnig en eil derez e bro Bondi, bro Vontroulez, bro Gerne, h.a. Diskouez a ra penaos n'eo na frammet na steuñvekaet diorren ar c'helenn divyezhek e Breizh evit ar poent.

An DFKE

Pouez ar c'heleñn divyezhek er c'hentañ derez dre gumuniezhañ kumunioù - Bloavezh-skol 2007/2008



Pa dremener d'ul live melestradurel tostoc'h c'hoazh d'an dachenn e verzer ez eus eus an hentad divyezhek e tremen an div bempvedenn eus DFKE² Breizh (41%). Pevar framm etrekumunel nevez o deus degemeret an deskadurezh divyezhek e 2007/2008 ouzhpenn-se : Kumuniezhañ kumunioù (K.K.) Gorre ar Vro Vigoudenn, K.K. Bro Gastellin hag ar Porzhe, K.K. Kanton Kallag ha Gwitreg Kumuniezhañ.

Merzout a reer ivez pegen dizingal eo ar c'hinnig kelenn divyezhek e kornôg Breizh. Dizingal-tre eo en Aodoù-an-Arvor dreist-holl ma kaver un nebeud DFKE dezho ur feur uhel a-walc'h (tremen 8% peurliesañ) e-skoaz peurrest an departamant ma n'eus tost kinnig ebet. Er Mor-Bihan, en enep, eo heverk K.K. Bro Josilin dezhi feur uhelañ an deskadurezh divyezhek er c'hentañ derez e 2007/2008 (14,3%), ha hi er-maez eus ar « brezhonegva hengounel ».


Kentoc'h war ar maez emañ an DFKEoù m'eo dereat pouez ar c'heleñn divyezhek (Kreiz-Breizh, Bro-Dreger hag aodoù Bro-Leon). Liammet eo ouzh poblañs rouesoc'h ar skolioù eno : n'eo ket ken niverus ar skolioù ha pa vez un hentad divyezhek en unan anezho ez eus danvez er stadegoù da bignat buanoc'h.

Ur c'hinnig divyezhek bennak a zo e tost holl DFKEoù kornôg Breizh hag evel enklozadurioù enno e teu war wel ar c'humuniezhoù kumunioù diwezhañ hep skol divyezhek ebet. Souezhus eo, da skouer, e vefe c'hoazh dibourvez kumuniezhoù kumunioù evel K.K. Bro ar C'hab, K.K. Bro Fouenant, K.K. Bro Bleiben, K.K. Gourenez Lezardrev,

² Diazeadurioù Foran a Genlabour Etrekumunel (EPCI e galleg).

K.K. an Trev, K.K. Bro Lannolon-Plouha, K.K. Blavezh, Gwelmeur hag ar Mor, K.K. an Teir Stêr (56). Ur souezh eo ivez kavout stok-ha-stok e Bro Dreger DFKEoù ganto feurioù e-touez re uhelañ Breizh ha DFKEoù all hep tamm kinnig divyezhek ebet.

Emdroadur feur ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez dre gumuniezhañ kumunioù evit 2007/2008 e-keñver 2006/2007




- Kresk en tu all da 4 foent
- Kresk etre 1 ha 4 foent
- Kresk dindan 1 poent
- Digresk
- Kinnig divyezhek ebet


Amañ ivez, emdroadur feur an deskadurezh divyezhek dre dachenn eo a vez lakaet war wel, da lavaret eo an diforc'h etre dregantad 2006/2007 ha hini 2007/2008.

Feur ar c'helenn divyezhek dre DFKE ha dre live (urzhiat diouzh pouez ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez) - Bloavezh-skol 2007/2008

| | Skol-vamm | Skol-gentañ | Ishollad ar c'hentañ derez | Emdroadur e-keñver 2006/2007 | Skolaj | Lise | Hollad |
|---------------------------------------|-----------|-------------|----------------------------|------------------------------|--------|-------|--------|
| K.K. Bro Josilin | 14,5% | 14,1% | 14,3% | 1 | 2,0% | | 9,4% |
| K.K. Bro Venac'h | 17,9% | 10,5% | 13,7% | -0,9 | | | 11,0% |
| K.K. Bae ar C'hernig | 13,7% | 13,8% | 13,7% | -0,5 | 5,6% | | 11,5% |
| K.K. an Teir Stêr | 15,7% | 11,1% | 12,8% | 4,3 | | | 5,4% |
| K.K. Kreiz Bro Dreger | 15,0% | 10,7% | 12,7% | 1,3 | | | 12,7% |
| K.K. ar Poc'hêr | 14,3% | 10,9% | 12,2% | 0,3 | 2,4% | 20,1% | 12,2% |
| K.K. Plabenneg hag an Aberioù | 12,5% | 9,9% | 11,1% | 0,2 | 6,9% | | 10,1% |
| K.K. Bro Leon | 11,5% | 10,1% | 10,6% | 1 | | | 5,8% |
| K.K. Gwengamp | 11,0% | 9,8% | 10,3% | -0,02 | 1,8% | | 4,4% |
| K.K. Bro Voulvriag | 14,4% | 5,6% | 10,1% | 5,8 | 45,5% | | 22,5% |
| K.K. Beg ar C'hra | 13,0% | 7,6% | 10,1% | 1,7 | | | 7,9% |
| K.K. Bro Lesneven hag Aod ar Mojennoù | 8,9% | 9,0% | 9,0% | 0,4 | 8,7% | 3,5% | 8,3% |

| | | | | | | | |
|--|-------|------|------|-------|------|------|------|
| K.K. Kreiz Breizh | 10,4% | 7,8% | 8,9% | -1,6 | 1,8% | | 5,5% |
| K.T.K. Lannuon-Treger | 10,6% | 7,3% | 8,6% | 0,03 | 3,2% | 0,9% | 5,4% |
| K.K. Bro Logunec'h | 10,7% | 6,9% | 8,5% | 1,3 | 2,0% | | 5,9% |
| K.K. ar Yeun Elez | 8,3% | 6,8% | 7,5% | -0,1 | | | 7,5% |
| K.K. Aod ar Meurvein | 6,3% | 7,3% | 6,9% | -0,1 | | | 3,3% |
| K.K. Bro Vaod | 8,8% | 5,0% | 6,6% | 1,3 | | | 4,8% |
| K.K. Bro an Alre | 8,5% | 5,1% | 6,6% | 0,1 | 1,0% | | 4,2% |
| K.K. Bro Landivizio | 8,1% | 5,4% | 6,5% | 0,6 | 1,2% | | 4,4% |
| K.T.K. Bro Kêr-Wened | 7,7% | 5,3% | 6,3% | 0,8 | 3,4% | | 4,0% |
| K.K. Stêr an Intel | 7,8% | 4,6% | 5,9% | 0,2 | | | 4,1% |
| K.K. Bro Douarnenez | 7,6% | 4,8% | 5,9% | 1,2 | | | 2,8% |
| K.K. Bro Landerne-Daoulaz | 7,6% | 4,3% | 5,7% | 0,6 | 1,3% | 0,4% | 3,5% |
| K.K. Kanton Kallag | 14,5% | | 5,1% | 5,1 | | | 3,5% |
| K.K. "Pempoull-Goueloù" | 6,2% | 4,0% | 4,9% | 0,4 | | | 2,3% |
| K Bro ar Roue Morvan | 4,1% | 5,1% | 4,8% | -0,1 | | | 2,6% |
| K.K. Sant-Yann-Brevele Kumuniezh | 5,9% | 4,0% | 4,8% | -0,3 | | | 3,2% |
| K.K. Su ar Vro Vigoudenn | 5,8% | 3,8% | 4,7% | 0,2 | | | 2,4% |
| K.K. Bro Ploue, ag ar Skorff d'ar Blavezh | 6,5% | 3,6% | 4,7% | 1 | 2,7% | | 4,1% |
| K.K. Bro Bondi | 5,3% | 4,2% | 4,6% | 1 | 1,0% | 0,0% | 2,5% |
| K.K. Bro Maoron ha Breselien | 4,5% | 3,9% | 4,1% | -1,4 | | | 2,7% |
| K.T.K. Kemper Kumuniezh | 4,9% | 3,6% | 4,1% | 0,1 | 3,7% | 0,1% | 2,6% |
| K.T.K. Bro an Oriant | 4,9% | 3,0% | 3,8% | 0,1 | 0,9% | 0,3% | 2,2% |
| K-kêr Brest Meurgêr ar Mor | 4,4% | 3,2% | 3,7% | 0,2 | 2,1% | 0,1% | 2,2% |
| K.K. Arvor ar Stêr-Aon | 3,4% | 3,8% | 3,6% | 0,1 | | | 2,6% |
| K.K. Bro an Hirwazh | 5,7% | 2,0% | 3,5% | 0,8 | | | 2,6% |
| K.K. Bro Gemperle | 4,6% | 2,8% | 3,5% | 0,4 | | | 2,1% |
| K.K. Gourenez Rewiz | 4,0% | 2,9% | 3,4% | -0,4 | | | 2,2% |
| K.K. Bro Redon | 3,1% | 3,4% | 3,3% | -0,01 | 1,1% | | 1,8% |
| K.K. al Loc'h | 2,8% | 3,1% | 2,9% | -0,1 | | | 2,2% |
| K.K. Bro-C'hlazig | 4,6% | 1,0% | 2,7% | 1 | | | 1,8% |
| K.K. Kerne-Uhel | 4,2% | 0,8% | 2,2% | 0,8 | | | 1,6% |
| K.K. Gourenez Kraozon | 2,1% | 2,3% | 2,2% | -0,5 | | | 1,5% |
| K.T.K. Bro Vontroulez | 2,9% | 1,4% | 2,0% | 0,2 | | | 1,1% |
| K.K. Bro Bloërmael | 2,3% | 1,3% | 1,7% | 0,02 | | | 0,8% |
| K.T.K. Bro Sant-Brieg | 1,6% | 1,6% | 1,6% | -0,1 | | | 0,8% |
| K.K. Konk-Kerne | 1,6% | 1,4% | 1,5% | -0,2 | | | 0,9% |
| K.T.K. Meurgêr Roazhon | 1,7% | 1,1% | 1,4% | 0,1 | 0,3% | 0,1% | 0,7% |
| K.K. Dinan | 1,7% | 1,0% | 1,3% | 0,1 | | | 0,6% |
| K.K. Gorre ar Vro Vigoudenn | 3,0% | | 1,3% | 1,3 | | | 1,1% |
| K.K. Bro Gistreberzh | 1,6% | 0,8% | 1,1% | 0,02 | | | 0,7% |
| K-kêr Naoned | 0,7% | 0,5% | 0,6% | 0 | 0,0% | | 0,3% |
| K.T.K. Kab Atlantel | 0,7% | 0,5% | 0,6% | 0,2 | | | 0,3% |
| K.T.K. Bro Sant-Maloù | 0,3% | 0,4% | 0,4% | 0,1 | | | 0,2% |
| K.K. Bro Gastellin hag ar Porzhe | 1,1% | | 0,4% | 0,4 | | | 0,2% |
| K.T.K. Gwitreg-Kumuniezh | 0,6% | | 0,3% | 0,3 | | | 0,2% |
| K.T.K. Bro Sant-Nazer hag hec'h Aber | 0,2% | 0,2% | 0,2% | -0,01 | | | 0,1% |

 Sifroù aet war greskiñ

 Sifroù aet war zigreskiñ

K.K. : Kumuniezh kumunioù, K-kêr : Kumuniezh-kêr, K.T.K. : Kumuniezh tolpad-kêrioù

Ar c'humunioù

Feur ar c'helenn divyezhek dre gumun ha dre live - Bloavezh-skol 2007/2008

| Depar- tamant | Renk | Kumun | Skol- vamm | Skol gentañ | Ishollad kentañ derezh | Emdroadur e-keñver 2006/2007 | Skolaj | Lise | Hollad |
|------------------|------------|--------------------------|---------------|----------------|------------------------------|------------------------------------|--------|--------------|--------------|
| Aodoù-an-Arvor | 96 | Bear* | 10,0% | | 4,5% | 4,5 | | | 2,1% |
| | 13 | Benac'h | 35,7% | 19,2% | 26,1% | -3,7 | | | 12,1% |
| | 66 | Boulvriag | 12,5% | 7,8% | 9,7% | 1 | | | 6,5% |
| | 4 | Bulad-Pestivien * | 100% | | 40,7% | 40,7 | | | 42,9% |
| | 1 | Chapel-Nevez (Ar) | 100% | | 100% | 0 | | | 100% |
| | 97 | Dinan | 6,4% | 3,5% | 4,5% | 0,2 | | | 1,0% |
| | 14 | Groñvel | 33,3% | 20,0% | 25,7% | 0,5 | | | 25,7% |
| | 38 | Gwengamp | 14,6% | 14,7% | 15,2% | 0,4 | 1,8% | | 3,8% |
| | 9 | Kawan | 40,6% | 27,1% | 33,2% | 1,9 | | | 33,2% |
| | 37 | Landreger | 18,9% | 14,5% | 16,0% | 1,1 | | | 3,9% |
| | 49 | Lannuon | 13,4% | 11,4% | 12,2% | 0,2 | 5,3% | 0,9% | 5,3% |
| | 99 | Louaneg | 9,1% | 0,6% | 4,3% | 0,3 | | | 4,5% |
| | 39 | Louergad | 15,6% | 14,7% | 15,1% | -1,8 | | | 15,1% |
| | 64 | Mêl-Karaez | 14,7% | 4,9% | 9,8% | 0,1 | | | 9,8% |
| | 10 | Pabu | 35,8% | 30,2% | 32,5% | -1,3 | | | 32,5% |
| | 57 | Pempoull | 14,6% | 8,5% | 10,8% | 0,3 | | | 3,6% |
| | 107 | Perroz-Gireg* | 9,4% | | 3,0% | 3 | | | 1,5% |
| | 19 | Perwenan | 37,8% | 17,6% | 24,0% | 2,8 | | | 23,8% |
| | 121 | Plijidi | | | | | 100% | | 50,8% |
| | 11 | Plistin | 38,5% | 24,1% | 29,7% | -0,7 | | | 16,0% |
| | 74 | Ploubêr | 6,5% | 8,8% | 7,8% | -1,3 | | | 7,8% |
| | 3 | Plounevez-Moedeg | 100% | 30,0% | 50,8% | 4,1 | | | 50,8% |
| | 44 | Rosphez | 28,2% | 6,7% | 13,5% | -2,3 | | | 13,5% |
| 8 | Rostrenenn | 38,6% | 31,4% | 34,1% | -1,1 | 2,4% | | 8,6% | |
| 101 | Sant-Brieg | 3,8% | 3,6% | 3,7% | -0,1 | | | 1,0% | |
| 106 | Tregaeg | 1,9% | 3,9% | 3,1% | -1,4 | | | 3,1% | |
| 23 | Tregastell | 25,0% | 17,1% | 20,7% | 2,9 | | | 20,7% | |

| | | | | | | | | | |
|-------------|-----|-----------------------|-------|-------|--------------|------|------|-------|--------------|
| Penn-ar-Bed | 67 | Banaleg | 10,3% | 9,4% | 9,7% | 1,3 | | | 6,0% |
| | 113 | Brest | 2,3% | 1,9% | 2,1% | 0,2 | 0,1% | 0,1% | 0,8% |
| | 92 | Brieg | 9,6% | 2,0% | 5,5% | 2,3 | | | 2,8% |
| | 72 | Daoulaz | 17,7% | | 8,1% | 1,7 | | | 2,7% |
| | 80 | Douarnenez | 9,1% | 5,5% | 6,9% | 1,4 | | | 3,0% |
| | 77 | Erge-Vras (an) | 9,1% | 6,1% | 7,3% | 0,9 | | | 7,2% |
| | 47 | Faou (ar) | 12,5% | 12,3% | 12,4% | -0,3 | | | 12,4% |
| | 88 | Gouenoù | 10,5% | 2,6% | 5,9% | 1,3 | | | 5,9% |
| | 83 | Gwiler-Leon | 8,4% | 5,4% | 6,5% | -0,1 | | | 4,3% |
| | 98 | Gwipavaz | 4,9% | 4,1% | 4,5% | 0,1 | | | 2,9% |
| | 21 | Gwiseni | 22,7% | 21,5% | 22,0% | 3,1 | 100% | | 49,8% |
| | 61 | Gwitalmeze | 10,7% | 9,6% | 10,1% | -1 | | | 5,9% |
| | 17 | Karaez-Plougêr | 27,3% | 18,9% | 24,2% | 0,8 | 2,4% | 20,1% | 15,6% |
| | 117 | Kastellin* | 2,7% | | 1,1% | 1,1 | | | 0,3% |
| | 75 | Kastell-Nevez-ar-Faou | 14,3% | 3,0% | 7,7% | 2,7 | | | 3,3% |
| | 25 | Kastell-Paol | 22,1% | 18,3% | 19,8% | 1,4 | | | 6,6% |

| | | | | | | | | |
|-----|----------------------|-------|-------|-------|------|-------|------|-------|
| 94 | Kemper | 5,6% | 4,1% | 4,7% | 0,2 | 3,6% | 0,1% | 2,6% |
| 108 | Kemperle | 5,0% | 1,6% | 2,9% | -0,2 | | | 1,0% |
| 15 | Kleder | 28,4% | 24,0% | 25,7% | -0,8 | 17,3% | | 23,3% |
| 5 | Kommanna | 44,4% | 33,3% | 37,4% | -0,4 | | | 23,1% |
| 114 | Konk-Kerne | 2,0% | 1,5% | 1,7% | -0,1 | | | 0,8% |
| 100 | Kraozon | 3,8% | 4,2% | 4,1% | -1 | | | 2,4% |
| 51 | Landerne | 14,7% | 9,9% | 11,9% | 1 | 1,7% | 0,4% | 4,8% |
| 71 | Landivizio | 9,9% | 8,0% | 8,8% | 0,6 | 1,4% | | 4,0% |
| 46 | Lanneur | 25,6% | 6,7% | 13,2% | 3,8 | | | 5,6% |
| 7 | Lanniliz | 42,8% | 28,2% | 34,2% | 1,7 | 7,5% | | 20,8% |
| 24 | Lesneven | 21,8% | 19,6% | 20,4% | 0,9 | 2,6% | 3,5% | 9,2% |
| 52 | Loperc'hed | 17,8% | 7,6% | 11,8% | 3,4 | | | 11,8% |
| 84 | Milizag | 12,2% | 2,4% | 6,4% | 3,1 | | | 6,4% |
| 87 | Montroulez | 8,3% | 4,6% | 6,1% | 0,3 | | | 1,8% |
| 42 | Plabenneg | 16,3% | 12,3% | 13,9% | 0,5 | 6,3% | | 10,7% |
| 73 | Plouarzhel | 17,2% | 2,0% | 8,0% | 1,5 | | | 8,0% |
| 31 | Ploueskad | 17,6% | 17,9% | 17,7% | 1,1 | | | 9,2% |
| 33 | Plougastell-Daoulaz | 21,8% | 14,3% | 17,3% | 0,3 | 3,8% | | 13,4% |
| 53 | Plougerne | 13,7% | 10,4% | 11,8% | -0,5 | | | 11,8% |
| 89 | Plougonvelen* | 14,3% | | 5,8% | 5,8 | | | 5,8% |
| 70 | Plouvien | 6,5% | 10,9% | 8,9% | -3,4 | | | 8,9% |
| 81 | Plouvorn | 15,3% | 1,2% | 6,8% | 2,1 | | | 6,8% |
| 102 | Plouzane | 4,4% | 2,9% | 3,5% | 0,6 | | | 1,9% |
| 12 | Ploveur | 36,4% | 23,9% | 28,9% | 3 | | | 28,9% |
| 68 | Plozeved* | 20,2% | | 9,6% | 9,6 | | | 4,6% |
| 93 | Pont-'n-Abad | 7,3% | 3,9% | 5,2% | 0 | | | 1,4% |
| 123 | Releg-Kerhuon (Ar) | | | | | 26,1% | | 9,8% |
| 27 | Rosko | 20,2% | 18,5% | 19,1% | 4,4 | | | 19,1% |
| 2 | Sant-Riwal | 100% | 100% | 100% | 0 | | | 100% |
| 35 | Sizun | 21,1% | 13,2% | 16,3% | 2,9 | | | 10,2% |
| 55 | Skaer | 12,2% | 11,0% | 11,5% | 1,4 | | | 7,2% |
| 82 | Tregon | 6,7% | 6,8% | 6,8% | -0,6 | | | 4,4% |
| 30 | Tremeven | 30,0% | 8,9% | 18,3% | 6,2 | | | 18,3% |

| | | | | | | | | | |
|--------------|-----|-----------------|-------|-------|-------|-----|------|------|------|
| Il-ha-Gwilen | 105 | Bruz | 3,6% | 3,0% | 3,2% | 0,8 | | 1,2% | |
| | 118 | Gwitreg* | 2,8% | | 1,1% | 1,1 | | 0,3% | |
| | 43 | Redon | 13,8% | 13,8% | 13,8% | 0,3 | 1,3% | 3,4% | |
| | 109 | Roazhon | 3,3% | 2,4% | 2,8% | 0,1 | 0,7% | 0,1% | 1,2% |
| | 119 | Sant-Maloù | 0,6% | 0,7% | 0,7% | 0,1 | | | 0,3% |

| | | | | | | | | |
|----------------|-----|------------|------|------|------|------|------|------|
| Liger-Atlantel | 112 | Gwenrann | 2,6% | 1,9% | 2,2% | 0,7 | | 0,8% |
| | 116 | Naoned | 1,6% | 1,1% | 1,3% | 0 | 0,1% | 0,6% |
| | 120 | Sant-Nazer | 0,4% | 0,3% | 0,4% | -0,1 | | 0,2% |

| | | | | | | | | |
|-----------|--------|-------------|-------|-------|-------|------|-------|-------|
| Mor-Bihan | 104 | Alre (an) | 4,5% | 2,7% | 3,4% | 0,1 | | 1,6% |
| | 63 | Baod | 12,7% | 7,9% | 9,9% | 2,3 | | 5,5% |
| | 28 | Begnen | 21,1% | 16,7% | 18,7% | -0,9 | | 18,7% |
| | 26 | Brec'h | 27,0% | 13,5% | 19,8% | -1,8 | | 8,4% |
| | 45 | Faoued (ar) | 14,4% | 13,0% | 13,5% | 0,1 | | 6,7% |
| | 36 | Gourin | 13,6% | 17,8% | 16,3% | 0,9 | | 5,5% |
| | 78 | Gregam | 7,3% | 7,1% | 7,2% | 0,1 | | 3,8% |
| 6 | Gwégon | 30,2% | 39,1% | 35,5% | -0,7 | | 35,5% | |

| | | | | | | | | |
|-----|-------------------|-------|-------|-------|------|------|------|-------|
| 76 | Gwened | 9,0% | 6,5% | 7,5% | 0,7 | 4,3% | | 3,4% |
| 85 | Gwidel | 8,3% | 5,1% | 6,4% | 0,8 | | | 4,3% |
| 91 | Henbont | 7,0% | 4,6% | 5,6% | 1,1 | 0,9% | | 2,3% |
| 34 | Josilin | 20,6% | 15,1% | 17,1% | 1,7 | 2,0% | | 8,0% |
| 58 | Karnag | 9,9% | 10,5% | 10,3% | -2,4 | | | 3,9% |
| 115 | Kewen | 2,7% | 0,6% | 1,4% | 0,4 | 1,2% | | 1,3% |
| 110 | Kistreberzh | 4,1% | 1,8% | 2,7% | 0 | | | 0,9% |
| 40 | Klegereg | 15,0% | 14,5% | 14,6% | 3 | | | 14,6% |
| 29 | Langedig | 22,5% | 15,6% | 18,4% | 0,5 | | | 14,0% |
| 90 | Lannarstêr | 7,1% | 4,9% | 5,8% | 0,3 | 3,0% | 3,5% | 4,6% |
| 48 | Logunec'h | 19,1% | 7,9% | 12,4% | 3,7 | 2,0% | | 6,0% |
| 32 | Lokoal-Mendon | 21,5% | 14,6% | 17,6% | 0,6 | | | 17,6% |
| 86 | Maoron | 6,8% | 5,9% | 6,3% | -2,4 | | | 3,5% |
| 20 | Mêlrant | 36,5% | 15,1% | 24,0% | -2 | | | 24,0% |
| 18 | Mourieg | 18,6% | 28,8% | 24,2% | -3,7 | | | 24,2% |
| 103 | Oriant (an) | 4,7% | 2,6% | 3,5% | -0,3 | 0,8% | | 1,5% |
| 56 | Pleskob | 16,2% | 8,4% | 11,5% | 3,4 | | | 11,5% |
| 69 | Pleuwigner | 11,8% | 7,9% | 9,4% | 0,5 | | | 6,3% |
| 111 | Ploermael | 3,5% | 2,0% | 2,6% | 0 | | | 0,9% |
| 60 | Ploue | 13,1% | 8,1% | 10,2% | 2,6 | 2,7% | | 6,5% |
| 62 | Plunered | 13,6% | 7,0% | 10,0% | 1,2 | | | 6,1% |
| 79 | Pluvergad | 9,3% | 5,5% | 7,2% | 0,8 | | | 7,2% |
| 22 | Pluverin | 22,4% | 20,8% | 21,4% | -0,7 | | | 21,4% |
| 54 | Pondi | 14,2% | 10,2% | 11,8% | 0 | 1,3% | 0,0% | 3,2% |
| 59 | Pont-Skorf | 12,9% | 8,5% | 10,3% | -0,4 | | | 10,3% |
| 50 | Santez-Anna-Wened | 13,2% | 11,5% | 12,1% | -2,1 | 5,5% | | 4,8% |
| 41 | Sant-Teve | 18,5% | 11,0% | 14,0% | 0,6 | | | 10,7% |
| 95 | Sarzhav | 5,5% | 4,1% | 4,7% | -0,9 | | | 2,7% |
| 65 | Surzhur* | 12,5% | 7,9% | 9,8% | 9,8 | | | 9,8% |
| 16 | Teiz | 30,1% | 20,9% | 24,6% | 0,4 | | | 26,6% |

 Sifroù aet war greskiñ

 Sifroù aet war zigreskiñ

* Lec'hiadoù nevez-digoret er gumun da zistro-skol 2007

Kresket eo ar feur e holl gêrioù-penn an departamantoù nemet Sant-Brieg. Ar brefediezh nemeti ma ne gaver ket c'hoazh an tri hentad divyezhek : ha pa vefe bet digoret ur skol Diwan eno e 1979, n'eo nemet e 2000 ez eus bet krouet ur c'hlas divyezhek gant an hentad publik ; n'eus c'hoazh nemet ul lec'h e Sant-Brieg gant an hentad-se ha hini ebet gant an hentad prevez katolik. Tremen daougementet eo bet pouez ar c'helenn divyezhek er c'hêrioù-penn departamant etre 1999 ha 2007 nemet e Kemper (m'eo bet lieskementet dre 1,84 memes tra).


Feur ar c'helenn divyezhek dre gumun ha dre live (urzhiat diouzh pouez ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez) - Bloavezh-skol 2007/2008


| Kumun | Depar-tamant | Skol-vamm | Skol gentañ | Ishollad kentañ derez | Emdroadur e-keñver 2006/2007 | Skolaj | Lise | Hollad |
|--------------------------|--------------|-----------|-------------|-----------------------|------------------------------|--------|------|--------|
| Chapel-Nevez (Ar) | 22 | 100% | | 100% | 0 | | | 100% |
| Sant-Riwal | 29 | 100% | 100% | 100% | 0 | | | 100% |
| Plounevez-Moedeg | 22 | 100% | 30,0% | 50,8% | 4,1 | | | 50,8% |
| Bulad-Pestivien * | 22 | 100% | | 40,7% | 40,7 | | | 42,9% |
| Kommanna | 29 | 44,4% | 33,3% | 37,4% | -0,4 | | | 23,1% |

| | | | | | | | | |
|---------------------|----|-------|-------|-------|------|-------|-------|-------|
| Gwegon | 56 | 30,2% | 39,1% | 35,5% | -0,7 | | | 35,5% |
| Lanniliz | 29 | 42,8% | 28,2% | 34,2% | 1,7 | 7,5% | | 20,8% |
| Rostrenenn | 22 | 38,6% | 31,4% | 34,1% | -1,1 | 2,4% | | 8,6% |
| Kawan | 22 | 40,6% | 27,1% | 33,2% | 1,9 | | | 33,2% |
| Pabu | 22 | 35,8% | 30,2% | 32,5% | -1,3 | | | 32,5% |
| Plistin | 22 | 38,5% | 24,1% | 29,7% | -0,7 | | | 16,0% |
| Ploveur | 29 | 36,4% | 23,9% | 28,9% | 3 | | | 28,9% |
| Benac'h | 22 | 35,7% | 19,2% | 26,1% | -3,7 | | | 12,1% |
| Groñvel | 22 | 33,3% | 20,0% | 25,7% | 0,5 | | | 25,7% |
| Kleder | 29 | 28,4% | 24,0% | 25,7% | -0,8 | 17,3% | | 23,3% |
| Teiz | 56 | 30,1% | 20,9% | 24,6% | 0,4 | | | 26,6% |
| Karaez-Plougêr | 29 | 27,3% | 18,9% | 24,2% | 0,8 | 2,4% | 20,1% | 15,6% |
| Mourieg | 56 | 18,6% | 28,8% | 24,2% | -3,7 | | | 24,2% |
| Perwenan | 22 | 37,8% | 17,6% | 24,0% | 2,8 | | | 23,8% |
| Mêlrant | 56 | 36,5% | 15,1% | 24,0% | -2 | | | 24,0% |
| Gwiseni | 29 | 22,7% | 21,5% | 22,0% | 3,1 | 100% | | 49,8% |
| Pluverin | 56 | 22,4% | 20,8% | 21,4% | -0,7 | | | 21,4% |
| Tregastell | 22 | 25,0% | 17,1% | 20,7% | 2,9 | | | 20,7% |
| Lesneven | 29 | 21,8% | 19,6% | 20,4% | 0,9 | 2,6% | 3,5% | 9,2% |
| Kastell-Paol | 29 | 22,1% | 18,3% | 19,8% | 1,4 | | | 6,6% |
| Brec'h | 56 | 27,0% | 13,5% | 19,8% | -1,8 | | | 8,4% |
| Rosko | 29 | 20,2% | 18,5% | 19,1% | 4,4 | | | 19,1% |
| Begnen | 56 | 21,1% | 16,7% | 18,7% | -0,9 | | | 18,7% |
| Langedig | 56 | 22,5% | 15,6% | 18,4% | 0,5 | | | 14,0% |
| Tremeven | 29 | 30,0% | 8,9% | 18,3% | 6,2 | | | 18,3% |
| Ploueskad | 29 | 17,6% | 17,9% | 17,7% | 1,1 | | | 9,2% |
| Lokoal-Mendon | 56 | 21,5% | 14,6% | 17,6% | 0,6 | | | 17,6% |
| Plougastell-Daoulaz | 29 | 21,8% | 14,3% | 17,3% | 0,3 | 3,8% | | 13,4% |
| Josilin | 56 | 20,6% | 15,1% | 17,1% | 1,7 | 2,0% | | 8,0% |
| Sizun | 29 | 21,1% | 13,2% | 16,3% | 2,9 | | | 10,2% |
| Gourin | 56 | 13,6% | 17,8% | 16,3% | 0,9 | | | 5,5% |
| Landreger | 22 | 18,9% | 14,5% | 16,0% | 1,1 | | | 3,9% |
| Gwengamp | 22 | 14,6% | 14,7% | 15,2% | 0,4 | 1,8% | | 3,8% |
| Louergad | 22 | 15,6% | 14,7% | 15,1% | -1,8 | | | 15,1% |
| Klegereg | 56 | 15,0% | 14,5% | 14,6% | 3 | | | 14,6% |
| Sant-Teve | 56 | 18,5% | 11,0% | 14,0% | 0,6 | | | 10,7% |
| Plabenneg | 29 | 16,3% | 12,3% | 13,9% | 0,5 | 6,3% | | 10,7% |
| Redon | 35 | 13,8% | 13,8% | 13,8% | 0,3 | 1,3% | | 3,4% |
| Rospezh | 22 | 28,2% | 6,7% | 13,5% | -2,3 | | | 13,5% |
| Faoued (ar) | 56 | 14,4% | 13,0% | 13,5% | 0,1 | | | 6,7% |
| Lanneur | 29 | 25,6% | 6,7% | 13,2% | 3,8 | | | 5,6% |
| Faou (ar) | 29 | 12,5% | 12,3% | 12,4% | -0,3 | | | 12,4% |
| Logunec'h | 56 | 19,1% | 7,9% | 12,4% | 3,7 | 2,0% | | 6,0% |
| Lannuon | 22 | 13,4% | 11,4% | 12,2% | 0,2 | 5,3% | 0,9% | 5,3% |
| Santez-Anna-Wened | 56 | 13,2% | 11,5% | 12,1% | -2,1 | 5,5% | | 4,8% |
| Landerne | 29 | 14,7% | 9,9% | 11,9% | 1 | 1,7% | 0,4% | 4,8% |
| Loperc'hed | 29 | 17,8% | 7,6% | 11,8% | 3,4 | | | 11,8% |
| Plougerne | 29 | 13,7% | 10,4% | 11,8% | -0,5 | | | 11,8% |
| Pondi | 56 | 14,2% | 10,2% | 11,8% | 0 | 1,3% | 0,0% | 3,2% |
| Skaer | 29 | 12,2% | 11,0% | 11,5% | 1,4 | | | 7,2% |
| Pleskob | 56 | 16,2% | 8,4% | 11,5% | 3,4 | | | 11,5% |
| Pempoull | 22 | 14,6% | 8,5% | 10,8% | 0,3 | | | 3,6% |
| Karnag | 56 | 9,9% | 10,5% | 10,3% | -2,4 | | | 3,9% |

| | | | | | | | | |
|-----------------------|----|-------|-------|-------|------|------|------|-------|
| Pont-Skorf | 56 | 12,9% | 8,5% | 10,3% | -0,4 | | | 10,3% |
| Ploue | 56 | 13,1% | 8,1% | 10,2% | 2,6 | 2,7% | | 6,5% |
| Gwitalmeze | 29 | 10,7% | 9,6% | 10,1% | -1 | | | 5,9% |
| Plunered | 56 | 13,6% | 7,0% | 10,0% | 1,2 | | | 6,1% |
| Baod | 56 | 12,7% | 7,9% | 9,9% | 2,3 | | | 5,5% |
| Mêl-Karaez | 22 | 14,7% | 4,9% | 9,8% | 0,1 | | | 9,8% |
| Surzhur* | 56 | 12,5% | 7,9% | 9,8% | 9,8 | | | 9,8% |
| Boulvriag | 22 | 12,5% | 7,8% | 9,7% | 1 | | | 6,5% |
| Banaleg | 29 | 10,3% | 9,4% | 9,7% | 1,3 | | | 6,0% |
| Plozeved* | 29 | 20,2% | | 9,6% | 9,6 | | | 4,6% |
| Pleuwigner | 56 | 11,8% | 7,9% | 9,4% | 0,5 | | | 6,3% |
| Plouvien | 29 | 6,5% | 10,9% | 8,9% | -3,4 | | | 8,9% |
| Landivizio | 29 | 9,9% | 8,0% | 8,8% | 0,6 | 1,4% | | 4,0% |
| Daoulaz | 29 | 17,7% | | 8,1% | 1,7 | | | 2,7% |
| Plouarzhel | 29 | 17,2% | 2,0% | 8,0% | 1,5 | | | 8,0% |
| Ploubêr | 22 | 6,5% | 8,8% | 7,8% | -1,3 | | | 7,8% |
| Kastell-Nevez-ar-Faou | 29 | 14,3% | 3,0% | 7,7% | 2,7 | | | 3,3% |
| Gwened | 56 | 9,0% | 6,5% | 7,5% | 0,7 | 4,3% | | 3,4% |
| Erge-Vras (an) | 29 | 9,1% | 6,1% | 7,3% | 0,9 | | | 7,2% |
| Gregam | 56 | 7,3% | 7,1% | 7,2% | 0,1 | | | 3,8% |
| Pluvergad | 56 | 9,3% | 5,5% | 7,2% | 0,8 | | | 7,2% |
| Douarnenez | 29 | 9,1% | 5,5% | 6,9% | 1,4 | | | 3,0% |
| Plouvorn | 29 | 15,3% | 1,2% | 6,8% | 2,1 | | | 6,8% |
| Tregon | 29 | 6,7% | 6,8% | 6,8% | -0,6 | | | 4,4% |
| Gwiler-Leon | 29 | 8,4% | 5,4% | 6,5% | -0,1 | | | 4,3% |
| Milizag | 29 | 12,2% | 2,4% | 6,4% | 3,1 | | | 6,4% |
| Gwidel | 56 | 8,3% | 5,1% | 6,4% | 0,8 | | | 4,3% |
| Maoron | 56 | 6,8% | 5,9% | 6,3% | -2,4 | | | 3,5% |
| Montroulez | 29 | 8,3% | 4,6% | 6,1% | 0,3 | | | 1,8% |
| Gouenou | 29 | 10,5% | 2,6% | 5,9% | 1,3 | | | 5,9% |
| Plougonvelen* | 29 | 14,3% | | 5,8% | 5,8 | | | 5,8% |
| Lannarstêr | 56 | 7,1% | 4,9% | 5,8% | 0,3 | 3,0% | 3,5% | 4,6% |
| Henbont | 56 | 7,0% | 4,6% | 5,6% | 1,1 | 0,9% | | 2,3% |
| Brieg | 29 | 9,6% | 2,0% | 5,5% | 2,3 | | | 2,8% |
| Pont-'n-Abad | 29 | 7,3% | 3,9% | 5,2% | 0 | | | 1,4% |
| Kemper | 29 | 5,6% | 4,1% | 4,7% | 0,2 | 3,6% | 0,1% | 2,6% |
| Sarzhav | 56 | 5,5% | 4,1% | 4,7% | -0,9 | | | 2,7% |
| Bear* | 22 | 10,0% | | 4,5% | 4,5 | | | 2,1% |
| Dinan | 22 | 6,4% | 3,5% | 4,5% | 0,2 | | | 1,0% |
| Gwipavaz | 29 | 4,9% | 4,1% | 4,5% | 0,1 | | | 2,9% |
| Louaneg | 22 | 9,1% | 0,6% | 4,3% | 0,3 | | | 4,5% |
| Kraozon | 29 | 3,8% | 4,2% | 4,1% | -1 | | | 2,4% |
| Sant-Brieg | 22 | 3,8% | 3,6% | 3,7% | -0,1 | | | 1,0% |
| Plouzane | 29 | 4,4% | 2,9% | 3,5% | 0,6 | | | 1,9% |
| Oriant (an) | 56 | 4,7% | 2,6% | 3,5% | -0,3 | 0,8% | | 1,5% |
| Alre (an) | 56 | 4,5% | 2,7% | 3,4% | 0,1 | | | 1,6% |
| Bruz | 35 | 3,6% | 3,0% | 3,2% | 0,8 | | | 1,2% |
| Tregaeg | 22 | 1,9% | 3,9% | 3,1% | -1,4 | | | 3,1% |
| Perroz-Gireg* | 22 | 9,4% | | 3,0% | 3 | | | 1,5% |
| Kemperle | 29 | 5,0% | 1,6% | 2,9% | -0,2 | | | 1,0% |
| Roazhon | 35 | 3,3% | 2,4% | 2,8% | 0,1 | 0,7% | 0,1% | 1,2% |
| Kistreberzh | 56 | 4,1% | 1,8% | 2,7% | 0 | | | 0,9% |
| Ploermael | 56 | 3,5% | 2,0% | 2,6% | 0 | | | 0,9% |

| | | | | | | | | |
|--------------------|----|------|------|-------------|------|-------|------|--------------|
| Gwenrann | 44 | 2,6% | 1,9% | 2,2% | 0,7 | | | 0,8% |
| Brest | 29 | 2,3% | 1,9% | 2,1% | 0,2 | 0,1% | 0,1% | 0,8% |
| Konk-Kerne | 29 | 2,0% | 1,5% | 1,7% | -0,1 | | | 0,8% |
| Kewen | 56 | 2,7% | 0,6% | 1,4% | 0,4 | 1,2% | | 1,3% |
| Naoned | 44 | 1,6% | 1,1% | 1,3% | 0 | 0,1% | | 0,6% |
| Kastellin* | 29 | 2,7% | | 1,1% | 1,1 | | | 0,3% |
| Gwitreg* | 35 | 2,8% | | 1,1% | 1,1 | | | 0,3% |
| Sant-Maloù | 35 | 0,6% | 0,7% | 0,7% | 0,1 | | | 0,3% |
| Sant-Nazer | 44 | 0,4% | 0,3% | 0,4% | -0,1 | | | 0,2% |
| Plijidi | 22 | | | | | 100% | | 50,8% |
| Releg-Kerhuon (Ar) | 29 | | | | | 26,1% | | 9,8% |

 Sifroù aet war greskiñ

 Sifroù aet war zigreskiñ

* Lec'hiadoù nevez-digoret er gumun da zistro-skol 2007

Pa urzhier ar c'humunioù diouzh pouez ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez e 2007/2008 e renabler 10 gant ur feur en tu all da 30% (unan ouzhpenn e-keñver 2006/2007), 24 en tu all da 20% (pevar muioc'h eget e 2006/2007) ha 62 (da lavaret eo un hanter eus an hollad) en tu all da 10% (seizh ouzhpenn e-keñver 2006/2007).

E Breizh dre-vras

Gwellaet eo c'hoazh ar c'hinnig war an dachenn, dreist-holl gant digoradur ul lec'h nevez en Il-ha-Gwilen (skol Diwan Magoer) ha skolajoù e Sant-Ervlan, Sant-Brieg ha Karaez. An digoradurioù all a zeu da greñvaat c'hoazh toleadoù a oa kreñv dija evel Bro-Leon (Lokournan ha Pleiber-Krist) pe bro Kêr-Wened (Ploveren hag en dije gellet digeriñ e 2007).

Evit an 31^{vet} distro-skol da-heul ez eus kresk gant ar c'helenn divyezhek. Kenderc'hel a ra ar c'hinnig d'en em zispakañ er vro a-bezh, muioc'h a skolioù divyezhek a zo ha degemer a reont muioc'h a skolidi. **En tu all da 12 000 skoliad zo er bloaz-mañ (12 287).**

Met tuadur ar c'hresk da c'horrekaat zo kadarnaet c'hoazh. **Feur kreskiñ izelañ biskoazh en istor ar c'helenn divyezhek e Breizh eo hini ar bloaz-mañ (+4,7%).** Ar pevare bloavezh diouzh renk ma stadomp an dra-se eo. Pell zo ne oa ket bet digoret ken nebeut a skolioù-mamm nevez (4 hepken). Moarvat eo merket muioc'h an distro-skol-mañ gant lec'hioù kreñvaet (astennet eo ar c'hendalc'h da 8 skol gentañ ha da 3 skolaj) eget gant lec'hioù nevez. **Kompren a reer neuze eo maget kresk an distro-skol-mañ gant lusk ar skolioù a oa anezho a-raok muioc'h eget gant digoradur skolioù nevez.**

War an dachenn

Unan eus keleier kalonekausañ an distro-skol 2008 eo al lañs zo gant **Diwan** e meur a geñver. **Dreist da 3000 skoliad eo tremenet an hentad dre soubidigezh er bloaz-mañ.** War e gartenn e konter div skol-vamm nevez, unan anezho e Magoer hag a zo an digoradur kentañ en Il-ha-Gwilen gant an hentad dre soubidigezh abaoe krouidigezh skol Roazhon e 1978. Ur c'heloù dispar eo en un departamant ma n'eo ket disoc'het ar raktresoù diwezhañ klasoù publik divyezhek. Ur skolaj ouzhpenn en deus digoret Diwan ivez (e Sant-Ervlan el Liger-Atlantel). A-hend-all, meur a skol Diwan a ya o sifroù war greskiñ kalzik evel skol Bariz peurgetket (tost daougementet), lec'hioù all a gresk daoust d'an diaesterioù o doa bet gwechall evel Kistreberzh (un drederenn ouzhpenn), Kommanna (ur c'hard ouzhpenn), Montroulez, h.a. Daoust da se n'eo ket strakus c'hoazh feur kreskiñ hollek an hentad dre soubidigezh met ma kendalc'h Diwan da vont war-raok e-giz-se e c'hellfe adkavout buan al lusk en doa a-raok 2002.

En tu all da 5000 skoliad eur tremenet er skolioù publik. An hentad-se eo a ya ar muiañ war-raok e Breizh e 2008, hag e Penn-ar-Bed dreist-holl. Nebeutoc'h a zigoradurioù zo er bloaz-mañ eget boaz avat. Div skol-vamm nevez hepken tra m'emañ keidenn an dek bloavezh tremenet etre pevar ha pemp lec'h nevez bep bloaz.

Skolioù all a oa ur goulenn bras a-walc'h evit digeriñ ur c'hlas divyezhek enno koulskoude (Banaleg, Gwizien, Pleiben, Sant-Stefan-Bregolou, d'an nebeutañ), pe gellet o dije digeriñ abretoc'h (evel Ploveren a oa prest bloaz zo dija). Dre ziouer a bostoù e c'hwit skolidi pe danvez skolidi war ar c'helenn divyezhek publik ouzhpenn-se (degouezh Merville eo ar skouer heverkañ). Ha pa ne vefe ket ken gwazh hag er bloavezhioù all **e chom kudennoù gant erlec'hiañ ar gelennerien divyezhek**: d'an distro-skol-mañ, holl erlec'hidi divyezhek ar Mor-Bihan a oa tapet evit ar bloaz dija, ar pezh en deus lakaet diaes skol Sant-Teve peurgetket. Kudennoù damheñvel a stader e lec'h all. E Lanniliz ez eus bet anvet ur skolaer divrezhonek en ur c'hlas divyezhek hag enkreiz zo e Redon evit ar mizioù a zeu.

Skouerioù e-touez re all ha diskouez a reont n'eo ket an doare merañ diouzh stad ar jeu hiziv an deiz ha ne ro ket an tu da respont mat d'ur goulenn a ouzer ez a war greskiñ a vloaz da vloaz.

En un enkadenn emañ ar c'helenn divyezhek er **skolioù prevez** dre-vras. Skoemp eo deuet da vezañ an darempredoù etre an Deskadurezh katolik hag ar gevredigezh kerent

Dihun Breizh abaoe 2006, ar pezh a noaz ouzh kresk ar c'helenn divyezhek er skolioù prevez d'an distro-skol-mañ. Ouzhpenn ma n'eus bet savet lec'h nevez ebet e 2008, evit ar wech kentañ ez eus bet serret unan en Oriant ivez. Re nebeut a gelennerien zivyezhek zo er skolioù katolik ivez ; brudañ hag ambroug o stummadur a vefe da wellaat.

A-hend-all ez a ar c'hinnig war wellaat en **eil derez** gant daou skolaj nevez en deskadurezh publik ha digoradur Skolaj Diwan al Liger-Atlantel. Gant Naoned e 2007 ha Sant-Brieg er bloaz-mañ e kendalc'h ar c'helenn divyezhek er skolaj en holl gêrioù-penn departamantoù Breizh evit ar wech kentañ.

Pa renker kumunioù Breizh diouzh an niver a skolidi divyezhek e teu war wel titouroù talvoudus. Ha pa chomfe Gwened ar gumun ganti ar sifr brasañ, emañ Roazhon o tostaat outi (an diforc'h etrezo zo koazhet eus 59 skoliad e 2007 da 11 e 2008). Brest, kêr vrasañ kornôg Breizh, hag hi en 11^{vet} renk, a chom c'hoazh er maez eus an dek kumun kentañ. Gant 44 skoliad nebeutoc'h e kouezh an Oriant eus ar 14^{vet} d'ar 21^{añ} plas en ur ober bloaz.

An Oriant eo al lec'h aroueziusañ eus an diaesterioù a c'hell ar c'helenn divyezhek talañ outo, en distro-skol-mañ : re nebeut a bostoù zo e skol publik Merville evit degemer an holl a c'houlenn bezañ degemeret ha serret eo bet klasoù divyezhek skol brevez Sant-Kristol. Erfin, e-touez holl gumunioù Breizh, **gellet he dije an Oriant tapout ar c'hresk brasañ er bloaz-mañ** (41 skoliad divyezhek ouzhpenn) **ha n'eo ket an digresk brasañ** (44 skoliad nebeutoc'h).

Respont gwelloc'h d'ar goulenn

Ne ziorro ket kenkoulz ar c'helenn divyezhek e Breizh hag e rannvroioù all zo. Diouzh ar c'henfeurioù, an digeriñ skolioù divyezhek er publik en Elzas pe e Norzheuskadi zo par da dremen 12 gwech ar pezh a stader e Breizh. Ha pa vefe disheñvel stad an traoù diouzh al lec'h e Breizh, e verzer atav ez eus **tremen 5 gwech muioc'h a zigoradurioù en Elzas pe en Norzheuskadi eget e Penn-ar-Bed** da skouer.

An dalc'h e Breizh n'emañ ket gant ar goulenn koulskoude. Ar skouerioù splannañ eus an dra-se eo al lec'hioù ma ne vez ket digoret er publik daoust d'ur goulenn zo bet stadet (Gwizien, Sant-Stefan-Brengolou, Banaleg, pe c'hoazh Pleiben, Koeron). E lec'hioù all, n'eus ket trawalc'h a bostoù evit degemer an holl re o defe c'hoant kregiñ gant o hentad-skol divyezhek pe o defe c'hoant da genderc'hel gantañ. Setu ur **goulenn "embannet"** ne vez ket bastet dezhañ. Hervez Div Yezh e vije bet tu da gaout un hanter muioc'h a skolidi ouzhpenn er publik dre respont d'ar goulenn-se hepken.

An hentad prevez a c'hellfe mont war-raok kemend-all pa ouzer peseurt lusk a oa gantañ betek 2005 met sac'het eo an diorren eno evit ar poent. Merzout a reer ivez eo kartenn skolioù divyezhek an deskadurezh prevez an hini digempouesañ. Padal er c'hornioù m'emañ diorroet eo emañ ar c'helenn divyezhek en e greñvañ dre-vras (bro Vrest, kreiz ar Mor-Bihan da skouer). War an dachenn-se e c'heller komz eus un **danvez goulenn anat** na vez ket bastet dezhañ.

A-hend-all e verzer e chom **distank betek re ar c'hinnig er c'hêrioù bras**. Alies a-walc'h ne vez staliet an hentadoù par-ouzh-par nemet en ur skol bennak tra ma vefe dav kaout ur c'hinnig tostoc'h da lec'h-annez ar gerent gant an diaes m'eo an dilec'hiañ e kêr. Stadañ a reomp e kav ur skol a ziloj kerent nevez diouzhtu (skouer skol Diwan Roazhon) pe pa vez digoret un eil lec'h en ur gumun vras ne ziorro ket diwar goust egile (skouer an Oriant). Er c'hêrioù bras n'eo ket a-walc'h kaout ul lec'h hepken evit pep hentad, **ret eo aozañ ar rouedad dre garter bremañ**.

En **eil derez** ivez ez eus ur goulenn eztaolet na vez ket bastet dezhañ gant ar skolidi niverus a rank dilezel ar c'helenn divyezhek dre ziouer a ginnig nes a-walc'h pa dremenont eus ar skol gentañ d'ar skolaj pe eus ar skolaj d'al lise. Dreist da gudenn ar c'hendalc'h,

alies ne vez ket doujet d'ar barelezh en eil derez publik ha prevez : boutin eo ne vefe kelennet e brezhoneg danvez nann-yezhel ebet war-bouez istor-douaroniezh.

Er c'hentañ derez emañ tremen 10 400 eus an 12 287 skoliad divyezhek kontet en distro-skol-mañ. 90% eus skolidi an daou hentañ par-ouzh-par zo er c'hentañ derez, da skouer, ha kinnig a reont tremen en eil derez daoust ma n'eo ket aozet e-doare da zegemer anezho en div yezh. Gant se eo pouezus kreñvaat ar strivoù evit tuta pe stummañ en diabarzh ar gelennerien divyezhek evit an eil derez.

Frammañ ar c'hinnig

Dres p'emañ ar Vretoned o reiñ un digor gwelloc'h-gwellañ d'ar c'helenn divyezhek e kendalc'h ar sifroù da greskiñ met gant ul lusk gorrekoc'h-gorrekañ. **Dislavar zo aze ha n'emaomp ket er blegenn-mañ e-tailh da dizhout ar pal suraat dazont ar brezhoneg**, anezhañ unan eus ar yezhoù en arvar da vont da get hervez an Unesco. Digresk an niver a skolioù en hentañ katolik (ha pa ne zeufe ket c'hoazh ur giladenn er sifroù hollek d'e heul) zo arouez kentañ un tuadur a c'hellfe kontammiñ an holl hentadoù ha c'hoari war an niver a skolidi war grenn dermen ma ne vez ket cheñchet mod ober.

N'eo ket labour ar gerent na hini ar bed kevredigezhel kavout gelennerien divyezhek evit ober war-dro o bugale; atebegezh an ensavadurioù e karg eo (Rektoriezh, Ensallerezhioù Akademiezh, Deskadurezh katolik). Ar C'huzul Akademiezh evit ar Yezhoù Rannvro a laka perzhidi ar c'helenn divyezhek d'en em vodañ evit ober ar poent hag eskemm etrezo. N'eo ket e labour programmiñ diorroidigezh ar c'helenn divyezhek avat.

Koulskoude ez eus ezhomm d'en ober. Prest eo ar bed politikel breizhat, a-du gant goulenn ar gevredigezh keodedel, da vont war an tu-se. War liesaat ez a skouerioù ar youl-se : steuñv politikerezh yezh ar Rannvro degemeret e 2004, krouidigezh e 2008 ur bodad gant Kuzul-departamant an Il-ha-Gwilen evit sevel steuñv diorren ar c'helenn divyezhek, emouestl ar c'humunioù a sin ar garta *Ya d'ar brezhoneg*, h.a.

Emdroadur ar sifroù kriz koulz ha hini an dregantadoù a ginnig un tuadur "seul vui, seul c'hoazh" e kornioù-bro zo koulskoude. Gant se ez a ar c'helenn divyezhek war-raok el lec'hioù m'eo kreñv dija (norzh Penn-ar-Bed, Bro-Dreger, Bro-Wened da skouer). Diskouez a ra ez eus ul lusk fonnusaat gant an hentañ divyezhek : seul vrasoc'h eo ar c'hinnig, seul vui a dud dedennet gantañ a zo. Prouiñ a ra ivez e vefe tu d'ober gwelloc'h en takadoù all.

Start e vo lakaat ar brezhoneg da sevel e gein en-dro hep un emouestl youlek eus ar Stad er politikerezh yezh. Evel ma vez graet gant Ofis Publik an Euskareg abaoe pevar bloaz, krouidigezh Ofis Publik ar Brezhoneg a zleje bezañ an digarez evit frammañ da vat ar c'hinnig kelenn divyezhek e-barzh ur politikerezh yezh hollek – gant kenlabour an holl gevelerien.